

Breizh Brevez

Naig Rozmor : **VAKANSOU**

P. M. Mével : **SEHOR**

Enez-Heuz dindan Loeiz XIV

Brezoneg ar mor ?

Mari Harnay

N° 64 - 1983

BRUD NEVEZ

Kelaouenn vrezoneg mizieg.

Niverenn 64.

Miz ebrel 1983.

Rener: Andreo Merser.
Sekretour: Jakez Salaun.

An oll lizerou ha skridou a zo da veza kaset da Brud Nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200 Brest.

Priz an niverenn-mañ: 10 lur.

Koumanant-bloaz:

- priz ordinal: 70 lur.
- koumanant-skoazell: azaleg 80 lur.
- studieren: 50 lur.
- broiou estrañjour: 100 lur.

Eur houmanant a dalvez evid 10 niverenn.

Ar chekennou-bank a zo da veza kaset war-eeun da: Brud nevez, 6, ru Beaumarchais, 29200, Brest.

Ar chekennou-post a zo da veza lakaet war K.R.P.: « Brud Nevez » 893-94 P Roazon.

Ar houmananchou evid ar broiou estrañjour a zo da veza kaset, e arhant peb bro, da: Dawson-France, B.P. 40, 91121 Palaiseau Cedex France.

I.S.S.N.: 0399-7014.

C.P.P.A.P.: 34 627.

Disklêriet hervez al lezenn: eil trimiziad 1983.

Moulet ez-prevez gand Brud Nevez.

C. evid an oll bennadou.

N'eus ket a aotre da adembann eur pennad diwar Brud Nevez heb beza bet an aotre d'henn ober.

Ar skridou hag ar pennadou a vez embannet e Brud Nevez n'emaint ket da veza lakaet war gont ar gelaouenn heh-unan, war gont ar re o-deus skrivet anezo hebken.

Ar skridou ne vint ket embannet a vo kaset endro ma vez tu.

Embannet e vez BRUD NEVEZ gand skoazell EMGLEO BREIZ.

Taolenn

✕ Naig Rozmor: Vakañsou, Follentez.....	3
✕ P.M. Mevel: Sel:or.....	5
✕ Y. Miossec: O laloupad war lanchou Breiz-Izel. VI.....	18
✕ L. Conq: Hekleo Traoñ-Bouzar. XIII. Da heuill ar pevar-amzer.....	24
✕ K. Riou: Etre Bourdel l'a Breiz, Enez-Heuz en amzer Loeiz XIV.....	34
✕ J.S.: Brezoneg ar mor, hini al leoriou pe hini an dud?.....	39
✕ K. Riou: Ar zantimanchou, ha bez' ez eus anezo c'hoaz?.....	43
✕ K. Riou: Penaoz e vez lavaret?.....	45
✕ J. Goyat: Mari Harnay: ar choaz mad.....	45
✕ Keleier ar miz: Eun an eil devez d'egile.....	47
✕ Kemennou.....	51
✕ Lizerou.....	52

Vakañsou

War vevenn eur gêr vraz, eur strêd paour o leski dindan pouez miz eost.

E traoñ ar strêd, eur poullad dour lor hag eur bugel drougwisket o c'hoari war e dro.

Diêz lavared pe 'z eo koant pe n'eo ket dindan e bennad bleo fuillet.

Karga ' ra dour e palviou e zaouarn hag e seblant gweled enno ar mor gand gwagennou, bigi gwenn ha morvrini; hag ar bugel en em lusk da heul e huñvre.

A-wechou c'hoaz, gand dour saotret, e klask lakâd e voutou da lugerni evel eur melezour.

Med ne gomprenan ket perag ar melezour ne zigas dezañ endro nemed skeudenn eur hi flao gand daoulagad voulouz du!

Naig Rozmor.

Follentez

Abae ar mintin laboused ar gwall-amzer
A zo o sakrei a-zioh an aod
Hag an avel oh ober daou-bennig.
Ar mor c'hwezet gand e imor
A greñch eonenn ouz ar reier
D'o dilasteza euz al lano du diweza.
Evel eur vamm gounnaret o kempenn he bugale,
Lonka ` ra beteg re govad peb kailler, peb saotr,
Lonka ` ra beteg koueza klañv euz fallagriez an dud.

Med an dud ne welint ket e angouni,
O konta arhant emaint.

Naig Rozmor.

Sehor

Pez-c'hoari c'hoarz-dihoarz e tri diviz

Tud ar c'hoari

Laouig Nihouarn, *labourer-douar*.
Channig, *an ostizez*.
Jerom Morvan, *kelenner e Pariz, e vakañsou*.
An aotrou Penanstêr, *pisikulteur, saver dluzed*.
Tinig Strullu, *eur hrennard*.

En eun ostaleri en eur vourhadenn e Kerne, e-kreiz miz eost 1976, bloavez ar zehor vraz.

Diviz kenta

Laouig

Diskenn deom eur mell banne bier all c'hoaz, Channig. Ken tomm eo, ha ken kraz an traou ma chom stag va zeod ouz va staon, e-giz p'am-ije lonket eun hanter-lur boultrenn... Jerom, Morvan, te hag e-teus deskadurez, peogwir out kelenner e Pariz, hag amzer a-walh ganit da lenn „Le Monde“ bemdez penn-da-benn, lavar deom 'ta ha padoud a raio pell c'hoaz ar zehor spontuz-mañ?

Jerom

Cheñchamant ebed, siwaz, Laouig, da hortoz evid an deveziou da zond. An añtisklon gwintet eeun a-uz d'or pennou a gas kuit ar houmoul hag an arme war-zu ar periferi, etrezeg ar Rusi. Hag ar satellit e-unan...

Laouig

A! Añtisiklonou, añtisiklonou brein! Setu aze anoioi braz ha n'int mad nemed da drompla an dud paour. Me 'oar deuz an amzer e-giz ma ouie va zad ha va zadou-koz araozon, gand ar voualh o houlen glao war beg ar brank, ar gwennili o nijal, an touseged o kana...

« Kanevedenn deuz an noz,
Glao pe a'el antronoz»...

Setu aze merkou sklêr, heb mond da glask añtisiklonou, satellitou na bitrakou evel-se.

Channig

Me 'm-eus klevet ar mintin-mañ er post Albert Simon o lared e vije marteze barradou glao ma yafe an avel diwar « Grande Sole » war-zu « Nord-Irland » ha « Sud Gaskogn »...

Laouig

Albert Simon! An istrogell-ze! Hervez ar pezh a gonter, hennez a zivin an amzer a raio gand sikour eur glesker, eur ranig war eur skeul vihan e-barz eur voutaill. (*C'hoarzin a reont*).

Channig

Marteze goude ar pedennou-goulen-glao laret gand ar person, ar brosesion hag ar venediksion, e yelo gwelohig an traou.

Laouig

Allaz! Paour-kêz Channig! N'anavezan sant mad ebed tro-war-dro amañ gouest da zigas glao. Sent n'eus diouto nemed evid an amzer gaer. Ar galloudusa anezo, gouzoud a rit, eo ar Zantig Du e-barz Iliz-Veur Gemper, a ra burzudou evid Goueliou Kerne. N'eo ket gwir, Jerom?

Jerom

O farsal emhout, Laouig! Pedennou d'ar Zent, prosesionou evid klask plega Lezennou an Natur! Gwasoh eged ar Zorserien gand o ardou gwechall! Ma n'eo ket eun druez! Mez, ya, mez am-eus a-wechou o tond endro e-pad ar vakañsou gand va haravan d'am bro hinidig, pa welan va henvroiz chomet kement diwar-lerh, ken « sous-développés »... Kredi koñchennoù gwrañ koz e kantved an atom, pa zouarer war al Loar, p'ema Viking II o fotografia ar blanedenn Meurz! ...Ha prosesionou-kaoud-glao goude Vatikan II!

Channig

O!O! Jerom Morvan! Ar zent, ma ne reent ket a vad d'an amzer, ne reent ket a zroug da vihanna. E-leh bremañ eo direnket kement tra en êr gand ar bombezennoù o tarza ha beb seurt ardivinkou sofisteket o trei endro da voulienn an tamm-douar-mañ.

Jerom

Nann, Channig... Brizkredennou tud dizesk a zo ganeoh adarre. Me a hell lared deoh ez eo dre faot ar Gouarnamant ma'z eus diouer a zour. Kentoh eged fabrika armou evid o gwerza d'an estrañjourien d'en em laza etrezo, e vije bet kalz furroh sevel chaoseriou, stankelloù a-dreuz ar stêriou, toulla puñsou don, dizalla an dour-mor, erfin emelloud eun tammig deuz ar bollusion hag an añvionamañ, ha kas war-raog eur politik « de l'eau ».

Laouig

Politik « de l'eau »! Dond a ra ganit 'va, Jerom! Pennou braz Pariz a zo troet dreist-oll d'ober ar politik « du vin »... ar pinar, te oar, evid paotred ar Hreisteiz. Evid ar « Bretagne », netra!...

Channig

Forz penaoz, ma kendalh ar zehor-mañ, e ranko kalz ahanom heb dale en em walhi gand dour mineral.

Jerom

A! Ar varhadourien dour-boutaill a raio o fortun ar bloaz-mañ... Ha c'hwi, Channig, c'hwi hag an ostizien all, n'ho-peus ket da glemm kennebeud. An amzer domm a boulz war-zu hoh ostaleri bandenna-

dou klianted sehedig, an tan en o gourlañchenn, hag e werzit dezo, me zo sur, barrikennadou bier, dour-frouez, limonad, heb konta al lorgnez chimik a lonker bremañ.

Channig

Ma Doue! An eil da gas d'egile, eur bloavezh mad goude unan fall!
An ostizien a rank gounez o boued e-giz ar re all.

Laouig

Hag an douristed, Jerom, paotred-o-vakañsou-hir, n'emaoh ket la-keet maleüruz, c'hwi, kennebeud... E-pad m'emaom-ni, ar beizanted, o teuler or c'hwezenn er parkeier dindan an heol bero, c'hwi n'ho-peus nemed kousked d'ober, ae hir goude merenn, pourmen war gorr ho roched, pe diroched, rouza ho krohenn war an trêz...« La belle vie, quoi!»

Jerom

A-dra-zur eo yahusoh beza amañ eged 'barz ruiou Pariz...

Laouig

Ha me 'gav din e ya re a zour ganeoh, gand ar merhed dreist-oll, a zo dalhmad war-dro an duellenn o walhi an eil penn pe egile diouto. Ne reont ket foultre kaer ganeom-ni al labourerien-douar, on-eus loened, saout, moh, legumaj da zoura bemdez... Ha diwar goll eo emaom o torta...

Jerom

Ba! C'hwi 'vo sikouret eur wech muioh diwar goust kargou tud ar hêriou.

Laouig

Me 'gredo pa welin ar gwenneien aze dirazon. Sur a-walh ne vo nemed eun aluzenn adarre.

Jerom

Te, Laouig Nihouarn, n'e-teus ket abeg d'en em glemm kement-se.

Eur stêr, ar stêr Lapig a dremen dre da zaouarou, ha lod a lavar e tennez dour founnuz diouti, kalz dour zoken, gand da bomp elektrik o trei noz-deiz, hervez ar vrud...

Laouig

Penaoz! Red a-walh eo din kemer an dour el leh m'ema, er stêr Lapig, peogwir eo eet pell 'zo va fuñs d'an hesk.

Channig

Unan hag a zo paket vil eo an aotrou Penanster, ar pisikultur, ar zaver dluzed, ema gantañ e boullou hag e lennou izelloh er stankenn eged da zouarou, Laouig. M'ho-pije gwelet e benn teñval disul diweza en overm-bred! Ranket e-neus teuler d'an teil eur bern euz e besked.

Laouig

O! Hennez, ar Penanster-ze a zo pinvidig a-walh, ha goude toud, me ne gavan ket mad ar pesked dour dous...

Eil diviz

(Setu o ij gouezoud an aotrou Penanster, ar pisikultur, eur bourhiz anezañ)

Channig

Sell 'ta piou! An aotrou Penanster! Pa gomzer deuz ar bleiz e vez gwelet e lost!... Resped deoh! E oam eeun o kaozeal deuz ho pisikultur, aotrou Penanster. Penaoz ema ar béd gand ho pesked? N'int ket krevet toud c'hoaz, emichañs?

An aotrou Penanster

(En em lezel a ra da goueza war eur gador, evel eun den digoñsertet; gand e voucher e tastum ar hwezenn war e dal).

Eur banne whisky, Channig, unan doubl... Va fesked, paour-kêz maouez, reuzeudig eo o stad. Ma welfeh anezo du-ze el lenn, o hov

d'al lae, digor braz o genou, mond a rafe bihan ho kalon hag an dour a zeufe en ho taoulagad.

Channig

Chê!...

Jerom

Oxijen... Oxijen eo a vank dezo. Moyenn 'vefe d'ober eun dra ben-nag evid savetei anezo: digas dezo oxijen e boutaillou braz. Pe neuze karga anezo e podezou, e listri danvez plastik, evid o has uhelloc'h, e leh ma'z eus dour freskoh... Ma vefe sentet ouzon...

An aotrou Penanster

Netra! Echu toud! Perag dispign arhant evid prena oxijen, pa'z int bremañ hanter-varo. Ha va faour-kêr dluzed bihan n'int ket kreñv a-walh c'hoaz evid gouzañv skuizderiou eur veaj... Nann, me zo eun den revinet... Diskennit din eur whisky all, Channig... Ha te, Laouig Nihouarn...

Laouig

O!O! Aotrou Penanster, arabad eo mond en tu all d'ar wirionez... C'hwî eo kreñv ho kein ha reud ho yalh. Pesked n'int ken pesked. Me vije bet loened-korn, ne lavaran ket. Med arabad en em jala nag ober gwad fall ablamour da besked pikou ruz! Pesked a-walh a zo er mor! Me gav din emaoch oh ober sinema ablamour d'ho pesked.

An aotrou Penanster

Te a gomz evel eun diskiant, eun irrespoñsabl, Laouig Nihouarn. Ha peogwir emout oh ober goap, sell, e larin dit eun dra krenn ha krak: ma varv va fesked a-viliadou, eo dre faot al laeron dour...

Laouig

Laeron dour! Biskoaz kemend-all! An dour a zo d'an oll. N'eo ket eun dra hag a hell beza laeret. Laeron dour! (*C'hoarzin a ra*).

10

Jerom

Geo, Laouig! Eun danvez prisiuz eo an dour. Heb dour, buhez ebed. Hag an dour a vez foranet ha drouzivet evel meur a dra all gand ar « Sosiete de Consommation ». *gaspille*

An aotrou Penanster

Gand ar zehor vraz kouezet war ar vro, al laeron dour a zo dañjeruz kenañ-kenañ; tenna a reont o bara digand ar bisikulteurien... Ha lod anezo, Jerom Morvan, n'emaint ket pell ahann... Nann... tostig zoken.

Laouig

Komzit frêsoh, mar plij...

An aotrou Penanster

Ma! E gwirionez, Laouig, te, te da genta a zo da veza tamallet. Mond a ra ganit al lodenn vrasa euz dour ar stêr Lapig, dour hag a zlefe beza laosket da redeg etrezeg va fisikultur. Te a laer va dour diwarnon.

Laouig

Me, eul laer! Eul laer dour! Bravoh c'hoaz!

An aotrou Penanster

Ya, te! Testou a-walh a zo. War zigarez pompa dour evid ezommou da atant, gand da zunerez varlonk, te a bomp hag a bomp noz-deiz, ha ne jom war da lerh nemed eur wazig priellek. Lod a lavar zoken e roez eur gwalh bemdez, eur « beñ » penn-da-benn da wizi ha da hohed da grevier, ouspenn kant anezo... Ha setu penaoz e varv va faour-kêz pesked, rag an dour eo gwad ar bisikultur.

Laouig

Konchennoh toud!... Gwarizi an dud! N'on ket evid leuskel va loened paour da grevi gand ar zehed war zigarez maga ho pesked. Hag ouspenn, ar stêr Lapig a dremen war va douarou, ha me eo a zo perhenn d'an dour-ze.

11

Jerom

Hopala, Laouig, eur fazi a rez. Hervez ar « Hod rural », mar deo dit gwele ar stêr Lapig war da zouarou, ne hellez ket evelato sevel stankou, derhel ganit kement banne dour a red. Al Lezenn eo...

Laouig

Al lezenn! Al lezenn! N'eo ket gand lezennou e vez lardet saout...

An aotrou Penanster

Va dluzed kennebeud ne vevont ket diwar êr an amzer...

Laouig

Dluzed! Petra eo talvoudegez ho tluzed e-kichenn hini eun taro bihan pe eur vamm-wiz? Dluzed! Pesked dour dous, blaz goular ganto, a werzit ker-ruz d'ar vourhizien...

An aotrou Penanster

An dra-ze ne zell ket ouzit tamm ebed, Laouig Nihouarn. Diwall, va faotr! Ne vi ket laosket d'ober da benn fall! Ha peogwir en em ziskouezez beza ken aheurtet ha ne fell ket dit intent rezon, emeon o vond dioustu d'ar jañdarmiri da zewel klemm, hag e houlennin ma vo kaset daou jañdarm da deuler evez war da droiou-kamm. (*Prest eo da vond er-mêz*).

Laouig

Jañdarmed! Spionerien war va douarou! Biken ne houzañvin! Hag al liberte neuze?

An aotrou Penanster

Liberte evid al laeron dour!... Plom dezo en o reor, hag er prizon, a lavaran-me.

Jerom

Arabad deoh mond e kounnar, paotred! Liberte d'an oll, med liberte

12

an eil a zo termen dezi e leh ma komañs liberte egile. Kavet e vo emichañs an tu d'en em glevet heb fachiri na violañs.

An aotrou Penanster

(*Fulor ennañ*). Laeron dour... torfetourien... muntreien... gangsterien!...

Laouig

(*Ken fuloret hag all*). Laer da-unan... Marhadour pesked brein!

An aotrou Penanster

Gwall-gomzou bremañ!... Kunujennou!... Mahomer... Pomper-noz!

Laouig

Flatrer brein, gwerzet d'ar bolised! (*Sevel a reont o moueziou hag emaint peg an eil e chupenn egile*).

An aotrou Penanster

Penn Chouant... Disvoueder ar pesked bihan! (*Taoliou dorn, skouarnadou a glever*).

Jerom

Alo, paotred! Arabad skei morse! Klaskit kentoh an dialog etrezoh.

Laouig

Staoter gwinegr! Julod!... Bremaig, va zammig aotrou, e vo desket dit beva!

An aotrou Penanster

Pemoh badezet... Bouellou braz!... (*Trouz ar meubl o taskal hag ar gwer o terri*).

Channig

Che! Ma Doue! Peseurt draill! Hag eet oh sod ho-taou? En em lopa

13

ablamour d'eur banne dour!... Kit er-mêz d'en em ganna da vihanna!
... Va gwer!... Va hadoriou!... C'hwi a ranko paea an traou torret...
Gwerhez venniget!... Ar gwella 'm-eus d'ober eo telefoni d'ar jañdar-
miri... Bremaig gwad ruz ha n'eo ket dour sklêr eo a redo...

Jerom

Alo, paotred! A-walh e-giz-se! Klevit mouez ar furnez! (*An emgann
a gendalh gwasoh-gwasa*).

Laouig

Suner gwad ar peizant!

An aotrou Penanster

Azen korneg! Chudaz!... Sell, hemañ 'ray vad dit!

Channig

Ha te, Jerom! Te 'jom aze da brezeg. Gra eun dra bennag evid o
dispartia, ma'z out eun den!

Jerom

Me! Me zo 'eneb ar violañs, hag aon am-eus da baka eun taol fall
bennag... Alo, paotred... N'eus ket mui ganeoh doareou tud sivilizet...
(*Trouz an emgann*).

An aotrou Penanster

Loen divalo... Touseg koeñvet...

Laouig

Dal hemañ... Hañ... Penndolog skragh...

Trede diviz

(*D'an ampoent e klever eur vouez er-mêz o hopal: an tan! an tan! Hag
eur hrennard, Tinig Strullu, a antre en eur redez, dianalet, e zaoulagad
dispourbellet*).

Tinig

An tan!... Buan... Buan, an telefon, Channig..

Channig

Petra ' zo o vond da goll, Tinig Strullu? Te zo ken ruz ha klipenn
ar hillog, ha prest out da vouga. Azez ha kemer da anal. Eur banne
champagn breton a ray vad dit...

Tinig

Nann, nann... An tan... Telefonit dioustu da bomperien Gastellin,
da re Gemper, Douarnenez... Lavarit dezo dond dioustu... gand o
hirri, o horzennou, eur buldozer... eun helikopter... eur hanader...
An tan...
(*Echu eo an emgann ha didrouzet an daou zen, lakaad a reont eun
tammig urz e-touez o dillad*).

Jerom

Peleh eo kroget an tan, neuze, Tinig?

Tinig

Da genta 'barz Gwaremm al Luz, e-touez al lann hag ar raden zeh.
Mousidi emichañs o fumi dre guz... Ha bremañ gand ar banne avel
a ra, an tan a hounez tachenn... Sellit dre ar prenestr...

Jerom

Gwir eo! Eur vokedenn a zav uhel, hag a dosta etrezeg ar vourh...

Laouig

O, gast! Ha va farkeier maiz, tost da Waremm al Luz...

An aotrou Penanster

Va fesked! Ma krog an tan er brouskoad war vord ar stêr Lapig, ema greet o stal d'an diweza dluzed a jom ganin... Poazet e vint e-beo.

Jerom

Eüruzamant n'ema ket va haravan war hent an tan...

Laouig

N'eus ket amzer da goll. Me 'ya dioustu gand va zrakteur ha va barrikennou da garga dour er stêr Lapig.

An aotrou Penanster

Ha me, gand va oto, da gerhad tud da rei an dorn, Laouig...

Laouig

Ya! ar muia-gwella. Digasit ganeoh saillou ha korzennou.

Tinig

Hastit buan goulenn sikour, Channig...

Channig

Ya, Tinig... neuze, an daou hourener, echu eo evid mad ho kroga-denn ganeoh?

Laouig

N'ema ket ken ar mare d'en em ganna... Ar wrez, Channig, eo a zo kaoz. Ganti e sav ar gwad e pennou an dud, ha mond a reont sod...

An aotrou Penanster

Gwir eo, Laouig. Da vleizi e oam eet. Ha ma pad ar zehor-mañ pell

c'hoaz, e vo lazadeg dre ar vro...

Laouig

Gwelloh koulskoude en em zikour dirag an dañjer, peizanted, piskulteurien hag all, en em unanit evid stourm 'eneb ar zehor!

An aotrou Penanster

Setu ar pezh e oan o vond da lared!... Amezeien vad adarre neuze, Laouig?

Laouig

Feiz sur! (*Starda a reont an dorn an eil d'egile*). Deom buan bremañ. (*Hag int er-mêz, Tinig war o lerh*).

Jerom (*o prederia*)

Drol a-walh, pa zoñjer. An tan e-neus lazet 'barz o halonou eun tan all elumet gand ar wrez hag ar zehor. A! Gwir eo ar pezh a lare ar Romaned gwechall: *Periculum amicos inimicos facit!* An dañjer a voug ar gasoni evel ma laz an dour an tan... N'eo ket gwir, Channig?

Channig (*o hortoz eur respont en telefon*)

Marteze a-walh! Med, Jerom, e-leh chom aze da zispaka da latin, e rafes kalz gwelloh reddeg buan da zikour ar re all, ha da weled pe n'ema ket da garavan o leski. (*Jerom er-mêz*). Bravig a-walh eo tremenet an traou an taol-mañ... D'am zoñj koulskoude n'eo ket echu c'hoaz an abadenn... Ar zehor, evel eur hleñved he-deus en em zilet e sañtimañchou an dud, ha kraz eo bremañ o halonou, ken braz hag ar parkeier tirienn... Nann, n'eo ket echu c'hoaz ar reuz... Alo... Pomperien Gastellin...

P. M. Mevel.

Notenn: Da vare zehor braz 1976 e oa bet savet ar sketch herr-mañ gand P.M. Mevel. Ne oa ket bet tu da voulla anezañ d'an ampoent. Gand ar glaoier dibaouez a zo koutezet warnom e-kerz an nevez-amzer-mañ, e ray ar pezig fentuz-mañ deom huiñreal en eun hañvez tomm adarre...

O haloupad war henchou Breiz-Izel

Eun enklask war ar brezoneg

VI

An enklask ne oan ket va-unan oh ober anezañ. An aotrou Du, beza ma 'noa da ober e labour er Skol-Veur hag e dezenn da aoza, e-neus greet meur a hini e-unan, Kenderhel a ranko da ober zoken pell c'hoaz ha kaoud ivez meur a hini d'e zikour dreist-oll e Bro-Wened. Eul labour hir ha luguduz eo.

Perag? Rankoud a reer henn ober partoud heñvel war ar memez roll-goulennou. Hemañ a zo eur roll hir, bet savet gand an aotrou Du e-unan, hag eñ ha kement enklasker all a deu d'e zikour a rank e heulia penn-da-benn, e kement parrez ma'z eont.

War ar roll ez eus daou hant deg goulenn. Ar re-mañ a zo goulennou simpl, simpl a-walh evid ma tlefe toud an dud beza gouest da respont dezo oll heb poan. N'o-dez da ober nemed rei ano brezoneg traou anavezet mad gand an oll. An dra-mañ a vez ésaet c'hoaz dre ma vez da heulia ar roll-goulennou, eur roll-imagou livet hag a zo warnañ eun imaj koulz lavared evid peb goulenn.

An enklasker a laka e roll-imagou dirag daoulagad an dud, a ziskouez dezo eun imaj en eur houlen diganto lavared sklér ar ger brezoneg a vez implijet evid envel an dra merket warni.

An anoioù goulennet evel-se ne vezont ket diêz da gavoud, peogwir ne vez goulennet nemed re al loened doñv a vez en tiegeziou, re anavaled gouez ha laboused ar vro, re an traou a zaver en tiegez, re kabourioù an ti ha labourioù en tiegez, ano ar chifrou beteg pemp warn-ugent. Goulennet e vez c'hoaz ar gerioù a vez implijet da gaozeal diwar-benn an amzer, ar zizun, an amzer vad, an amzer fall, diwar-benn ar prejou, ar gerentiach ha diwar-

benn meur a dra all ken êz da gavoud hag ar re-ze.

Goulennet e vez ivez trei e brezoneg frazennoù galleg berr evel: « Il ne sait plus parler breton ».

Da beleh ez een goude da bourmen va goulennou, da ober va enklask? Mond a reen d'ar barrez ma karen, gand ma veze trizeg pe bevarzeg pe bemzeg kilometr etrezi hag ar barrez ziweza a vezen bet e-barz, da lavared eo pell a-walh evid ma hellfed soñjal e tlee dija beza deuet eur cheñchamant bennag.

En em gavet eo bet ganen goulskoude kaoud da ober daou enklask er memez parrez pa deue din gouzoud e veze enni eur horn bennag hag a veze eun tamm disheñvel ar haoze ennañ.

Evel-se e parrez Kombrid.

Eno, er bourk, em-oa bet evid respont d'am goulennou Yann an Touller hag e wreg. « An Touller » ne oa nemed lesano an den, eun den a-zoare hag a oa bet e vicher ar chalboterez. Med beza ma oa chalboter e oa eñ eo a veze ivez o toulla ar beziou. Abalamour da ze eo e veze greet outañ Yann « an Touller ». An dra-mañ ne vire ket outañ da veza chomet eun den laouen hag an enklask a oa eet mad-kenañ ganeom.

Med er mêri, ar zekretourez he-doa lavaret din e oa red din ivez mond da gaozeal gand unan bennag euz bourk Sant Vuarn (e galleg: Sainte-Marine). « Eno, emezi, ez eo eun tamm disheñvel ar haoze.»

Sant Vuarn a zo eur bourk bihan war vord aber ar stêr Oded, eur porz bihan euz ar re gaerra, just dirag Benoded, el leh ma veze treuzet ar stêr gand ar vag a-raog ma oa bet greet ar pont nevez.

Eur pennad brao emañ euz bourk Kombrid, pevar pe bemp kilometr, med e parrez Kombrid emañ atao.

Pa oan bet eno, d'ar c'hweh a viz even 1972, e oa brao-kenañ an amzer. Dindan an oabl glaz hag an heol o para, e oa eun dudi gweled deliou glaz-nevez ar gwez uhel a-zioh an aod, dour ar mare en e uhella, frankil ha gwenn evel arhant, toennou glaz an tiez koz hag ar bagou gwenn gand o bord glaz pe ruz-flamm.

E Sant Vuarn e oan en em gavet evid va enklask gand eur gwir bleiz-mor evel re wechall. Eur bleiz-mor koz a driweh vloaz ha tri-ugent, kreñv ha divorfil c'hoaz. Pa 'm-oa kavet anezañ, da zeg eur diouz ar mintin, e oa pell a oa dija war-zav, beza ma oa bet en noz a-raog oh ober eun dro besketa

gand e vab betek eun eur diouz ar mintin. E spered goulskoude a oa sklêr ha diskuiz a-walh evid respont mad d'am goulennoù.

Med gantañ n'em-oa netra nevez ebed da zeski. E gaoze, en desped d'ar pezh he-doa lavaret din sekretourez an ti-kêr, a oa heñvel-poch ouz hini Yann an Touller e bourk Kombrid.

Eur wech choazet eur barrez ganen, pa vezen war ar plas, em-meze eur gudenn all da ziluzia: penaoz kavoud tud da respont d'ar goulennoù? An dra-mañ ne vije ket diêz ma hellfe an enklasker choaz ar re a garfe. Med, siwaz, war ar poent-se ne hell ket ober ar pezh a gar. Re vraz e vije an traou evitañ ha pe seurt plijadur e kav deoh e-nije, ma ne rankfe ket plega d'eur reolenn bennag ha kemered eun tamm muioh a boan?

Heulia a rank reolennou striz, peder reolenn. Hervez an hini genta, ne hell choaz evid respont d'e houlennoù nemed tud ganet er barrez a vez greet an enklasker enni. Hervez an eil, ez eo red ivez e vefe ginidig euz ar barrez tad ha mamm an dud-ze. An drede reolenn a laka ez eo dleet ne dije ket an dud choazet kuitaet biskoaz ar barrez nemed, evid ar wazed, e-pad o amzer-zervich pe e-pad ar brezel. Hervez ar bevare, ez eo dleet ouspenn o-defe kendalhet atao da gaozeal brezoneg ingal er gêr.

Perag ar reolennou-ze? Abalamour ma'z eo red kavoud tud gouest da rei eun testeni sur euz brezoneg ar barrez, eur brezoneg hag e-neus kendalhet da chom heb beza mesket pe gand ar galleg pe gand eur brezoneg all eun tamm disheñvel.

Rag a-wechou ne ranker ket mond pell evid gweled cheñchamant a-leiz. Eur menez, eur rivier vihan zoken a zo a-walh (a oa kentoh a-walh gwechall) evid lakaad ar haoze da veza disheñvel. Etre parrez Gwiglan ha parrez Plouenan, en eun tu, ha parrez Taole, en tu all, n'eus nemed eur rivier striz. Mad, en tu all da bep hini euz an diou rivier, e parrez Plouenan hag e parrez Taole, ne zistager ket toud ar gerioù evel ma reer e parrez Gwiglan.

Kompren a heller neuze êz e hell beza merket kaoze an den choazet e Gwiglan evid an enklasker gand hini e dad pe e vamm, ma vez deuet unan anezo euz unan euz an diou barrez-se. Med an dra-mañ a zo gwir ivez evid kement parrez a zo. Setu n'eus ket da veza estonet ma vez red d'an enklasker heulia ar reolennou-ze.

Med an dra-mañ e-neus eun efed evitañ: lakaad a ra da veza bihan niver an dud a hell choaz evid e enklasker, rag abaoe ar brezel pevarzeg, dreist-oll dre ma oa deuet er vro, da genta, ar velo ha, goude an oto, an dud a oa en em lakaet da vond da zimezi afiez pell diouz o farrez. Setu em-eus gwelet n'eo ket êz ken kavoud eur gwaz hag e wreg o-daou euz ar memez parrez.

Gwelet em-eus ivez, meur a wech, e teu buan brezoneg ar gwaz da veza merket gand hini e wreg hag hini ar wreg gand hini he gwaz, pa ne vezont ket euz ar memez parrez. Poueza a reont buan an eil war egile.

Med an enklasker e-neus c'hoaz da gonta gand eur reolenn all, unan hag a n'eo ket bet lakaet dezañ gand den ebed. Homañ goulskoude a deu bremañ da lakaad e enklasker da veza diêz a-walh da gas da benn.

Gwechall, pa veze an aotrou Pierre Leroux oh ober e hini, an dud a oueze beva kalz frankilloh eged bremañ. Gouzoud a reent kemered o amzer, da vihanna pa ne veze ket poent al labourioù braz, ar foenn pe an eost. Dond a ree dezo neuze, pa veze leh, gouzañv heb poan ebed leuskel al labour a-zav ha chom eur pennad da ehana. Bremañ n'eo ket heñvel ken. Bremañ e fell da doud an dud, koz ha yaouank, mond atao a-laz-korv, heb paouez biskoaz, euz ar mintin betek an noz, evel ma ne vije greet ar vuhez nemed evid klask gounid arhant.

E pemp enklasker ha kant, n'em-eus ket gwelet nemed daou zen diwar ar mêz oh asanti dilezel o labour eur pennad evid dond d'ar gêr da respont d'am goulennoù. « N'em-eus ket a amzer! » a veze respontet din peurlvuia.

Unan euz an daou-ze a oa e oad o lakaad anezañ da veza furroh eged ar re all peogwir e-noa dija daouzeg vloaz ha tri-ugent. An eil a gave e oa kalz talvoudusoh ar pezh a ree evidon. Yaouank a-walh e oa c'hoaz rag n'e-noa nemed eur bloaz hag hanter-kant. Ouspenn e oa e penn eun tiegezh braz a oa ennañ tri-ugent loen-korn. Pa oan eet d'an ti d'e glask, e wreg he-doa lavaret din: « N'emañ ket er gêr. Eet eo d'ar park da drei douar da lakaad kaol-fleur. It d'e gavoud. Med ne gredan ket e laoskfe e labour bremañ. » Mad, pa gavan anezañ ha pa lavaran dezañ evid petra on deuet, ez on souezet o kleved anezañ o respont din: « Ya, aotrou, mond a ran ganeoh d'ar gêr. Plijadur em-mo o respont d'ho koulennou. Eun tamm repoz ne ray ket a zroug din. Al labour-mañ a hell gortoz eur pennad. »

Rouez eo bremañ an dud a oar evel hennez n'eo ket red dezo beza atao o terri o reor o labourad, e ra vad ivez chom a-zav beb an amzer.

Med dre ma'z eo ken dalhet an dud gand o labour hag ivez dre ma pad an enklasker eun eur-hanter ha div eur, a-wechou ouspenn, e rank an enklasker kavoud tud hag a n'o-deus netra ebed ken da zerhel anezo stag. An dra-mañ ne vez ket êz dezañ atao. E gwirionez ne hell ket koulz lavared kavoud nemed tud koz, tud hag o-deus paouezet da labourad.

Ar beurrasa anezo o-deus etre tri-ugent ha pemp bloaz ha tri-ugent. Med tud an oad-ze a oar mad-kenañ ar brezoneg, eur brezoneg hag a n'eo ket bet mesket gand kalz a herioù galleg. Ouspenn a-leiz anezo a zo chomet

solid war o hillorou, a zo c'hoaz lemm o spered, divorfil o memor ha distagellet mad o zeod.

Div eur enklask, heb distag ebed nemed eun taol farsal beb an amzer, ne deuont ket a-benn d'o skuiza. Peurvua e kemeront plijadur o respont d'ar goulennou. Gweled a reer daoulagad meur a hini o vervi gand an herrder kement hag er skol re ar vugale pa 'dez eur mestr hag a ouez lakaad anezo da heulia e genteliou gand plijadur. Lod zoken a lavar laouen e kav dezo beza en eun taol-kont distroet eur pennadig hanter-kant vloaz war o hiz, d'ar poent ma'z eent d'ar skol. Kalz a blijadur o-dez ar beurrasa anezo o respont d'ar goulennou. Ar beurrasa, rag en em gavoud a ra a-wechou gand an enklasker koueza war eur hanfard bennag hag a gav dezañ beza re fin evid respont da houlennoù hag a n'int ket, emezañ, nemed diotachou a-veh mad evid bugale vihan.

Eun devez a viz ebrel 1971, e oan en em gavet, en eur barrez tost da Gastellin, da gaoud evid an enklask eun den braz ha teo, ruz e benn, evel unan hag a gav re vad e vanne; med en devez-se e oa diwar an dour. Ne oa ket gwall goz c'hoaz, just tri-ugent vloaz. Bet e oa labourer-douar ha ne oa nemed teir pe beder zizun abaoe ma 'n-oa kuitaet e diegez evid e leuskel d'e vab hag ivez evid kaoud ar vozad vrao a arhant a roe dezañ ar gouarnamant evid mond kuit. An dra-mañ ne vire ket outañ da genderhel da labourad evel a-raog rag n'e-noa klasket nemed ruilla ar gouarnamant ha tenna arhant digantañ. Eur paotr fin, neketa, a oar atao en em denna, da vihanna kavoud a ree dezañ beza fin.

Pa gomansan gand goulennou an enklask, e welan anezañ a-greiz-toud oh en em lakaad da dorta o hoarzin a-raog lavared din: « Med, aotrou, an traou a houlennit diganen n'int nemed diotachou. Me a gave din e oah o vond da houlennit diganen traou hag a dalv ar boan. Med gand ar goulennou-ze ne rit nemed lakaad ahanon da goll va amzer. Traou evel ar re-ze a dlefeh kentoh mond d'o goulenn digand bugale deg vloaz.»

Kaer am-eus klask rei dezañ da entent ar pezh on-eus c'hoant ober gand e respontou ha re an dud all, ne deuan ket a-benn d'henn ober. Derhel a ra da lavared din: « Ar pezh a houlennit diganen n'eo nemed soñhennou!» —« Marteze, a respontan dezañ, med, ar zohennou-ze, deom-ni ez eo red o haoud!»

Ne lavarin ket n'on ket hegaset, gwall hegaset zoken, gand feson an den.

Kenderhel a ran goulskoude da houlennit digantañ ar pezh am-eus da houlennit. Med ne roan ket ken dezañ an amzer da hoarzin. Ar goulenn nevez a deu kerkent ha ma vez deuet ar respont. Setu a-benn eur pennad, va den a

chom sebezet pa wel n'eo ket gouest da respont da veur a hini euz ar goulennou, eun tamm diêsoh, pa deu dezañ beza boud. Toud e fouge a gouez neuze en eun taol hag em-eus ar blijadur da weled anezañ o komañs selled a-dreuz ouzin, tost dezañ da deuzi gand ar vez.

An enklask n'eo ket gwall vad, med n'em-eus ket kollet va amzer. Desket em-eus c'hoari derhel penn da unan hag a gave dezañ e oa eur paotr din na marteze desket dezañ n'eo ket mad klask ober goap euz ar re all.

Eüruzamant n'em-eus ket gwelet kalz a dud evel hennez.

Yves Miossec

(da veza kendalhet)

Notenn: **Brud Nevez**, niverenn 63, p. 9, linenn diweza, lenn: metken, dindan an ano a **gaz-koad**, e meur a blas e vez roet dezañ eun

Loeiz Roparz

Brezoneg 'n eur gana

— En ti bihan lein ar menez; kan ar hejer; Son ar c'hwenn; Pa oan o sevel lein ar roz; Biskoaz 'm-oa c'hoarzet kemend-all; Tond d'ar gêr euz a Rostren; Al laouenanig; Ev' chistr 'ta, Laou; Kabiten St-Malo; Bannielou Lambaol; Ar hoz paotr-yaouank-koz; Metig.

Eul leorig: 7 lur (50g)

Eur vinikasedenn: 40 lur (100g)

Hekleo Traoñ-Bouzar

XIII

Da heuill ar pevar amzer

*« Labour ar houer a zo grozig zoken en e finesaou!
Mez ken burzuduz en e frouez!
Goude oll ar houer a gomz euz frouez an douar,
Nann, euz frouez e labour!
Doue a ra al labour:
Sevel an talvouduz, an den meur, ar zant! »*

H. Pourrat

Er goañv e teue buan an noz! Ha ne oa c'hoaz en tiegeziou nemed lutigou da sklêrijenna diouz an nebeud a dud. Just a-walh evid mond an eil e-biou d'egile, dreist-oll er hrevier hag er porz. En ti, ne veze elumet al lamp braz petrol nemed da goaniou an deveziou braz a labour, pe evid ar beilladennoù c'hoari domino. Er-mêz hag er hrevier, oa red ober gand eur hoz letern bennag..., keit ha n'oa ket mouget gand an avel hlao.

Poan a veze o treina, etre ho tioureh, boutegadou lann-bill ba'r uhel d'ar hezeg, pe c'hoaz boutegadou karotez. Ha d'ar zaout boutegadou rabez, ruta, ma n'oa ket kaol draillet. Poan ivez gand ar behjiou kolo ha foenn a deue d'ar hrevier war gein an dud. Med ne zoñjent ket en em

glemm kement-se. Ha ne oam ket maleuruz daoust da ze. Evel-se edo an traoù, ha n'oa ket e mod all! Petra bennag ma klasked neuze ivez skañvaad al labour.

Poan c'hoaz en divreh o vond da gerhad en nebeud kravazadou geot, er foenneier douret, da lakaad e-touez al lann-bill d'ar hezeg. Gand ar risk! eur wech war ziu da garga ho poutou-koad. Al lann-bill, bremañ ne veze mui pilet el laouiri vein gand morzoliou evel gwechall, mez draillet. An draillerez lann a oa en eul lochenn zoul greet evid ar goañv e-kreiz al leur, hag a droe dre eur manej dre loan.

Ar manej-ze a droe an dornerez e miz eost hag e miz gwengolo evid ar gwiniz du. Mez pemp pe c'hweh loan neuze outañ hag eur haser kezeg war ar « plate-forme ». Mez chomom gand ar miziou goañv. Eul labour e-touez ar re boaniusa a zo bet atao war-dro an teil. Pe e veze tennet kuit bemdez, an teil diouz ar hrevier, pe e oe laosket evid eun nebeud miziou da vernia dindan treid ar chatal! Karga an teil er harr diwar ar bern a oa kaled! Mez karga anezañ diwar bave ar hrevier a dlee beza spontuz! Kaset d'ar park, oa diskarget a-vernioù bihan. Ha goude-ze ledet gand ar forh a bevar biz. An dra-mañ a ree deoh ho tivreh, me lavar deoh!

Labour an douar a oa kalz gwellaet, greet bremañ kalz fichoh eged en amzer goz gand an arar koad, gand e zoh houarn hag ar varr. Bremañ e oa eun arar kigner hag a droe al leton gand an teil da genta, treinet gand daou loan.

Goude-ze eun tamm roulo bihan mein a blade ar bomm war-lerh eur gazeg all, aliez al louach. Ha goude e teue an alar tumber, gand tri loan all da zigas war gorre an douar blod. Al labour-ze a helle paka eun troatad donder.

An eost a veze gonezet evel-se etre an daou vomm: an hader a heulie ar roulo bihan, ouz e vreh kleiz eur baner hir ha moan leun a had. Ha gand e zorn dehou e taol dirazañ ar greun ingalet war ar bomm pladet: segal, kerh, segal-winiz, eun tamm gwiniz bennag. Penn an ero a vezo kempennet mad ha brao gand paotr ar pennoù. Mez a-nebeudou bremañ e teue hadeurejoug dre loan evid ar boued chatal, ha zoken evid ar goni-degez. Ken buan da heuill e teuas ivez brabigner lamm-penn, hag a ree koulz labour eged an eler bihan gand nebeutoh a jao, hag ivez nebeutoh a boan, nebeutoh a fezier a hirder ar parkeier.

Pa deue ar peuri da boulza gand an hañv, kerkent ha ma teue eun tamm heol goude ar glao en nevez-amzer, ar zaout a veze taillet dezo o lodenn bemdez: greet e veze dezo treina chadennoù evid beza suiet er park da drei endro da eur strapenn hag a veze diblaset evid rei eul lodenn beuri all.

Echu ar goañv, setu ar halz euz ar gounidegez da ober: kerh ha gwiniñ hañv, heiz ha pell goude... ar gwiniñ du. An oll draou-ze a vo hadet bremañ gand an haderez en or hêr. Evel-se e hellem eun tammig ober eur sklabez c'hwennerez zoken d'an eost, gand on treñch, eiz pe pemzeg deiz diouz renk. An dra-mañ a dalveze ar boan, daoust ma oa labouruz-kenañ. Ar boued chatal a ziwane. Ha kerkent ar patatez douaret, oa poent soñjal er c'hwennerez.

Bez' oa eul labour hir, nann evid ar hezeg en diskuiz en Terrier braz, mez evid an dud dreist-oll e Traon Bouzar, ken anavezet evid e wiskajou louzeier fall! Ar c'hwennerez a oa daoubennet gand amzer ar foenn da ober. Bez' edom er park eta euz ar mintin beteg an noz, a-vandenn a bemp pe c'hweh c'hwenner ha c'hwennerez asamblez. Hag ez eem war a-raog aliezig gand kaoz adkemeret ha kendalhet war eur bern traou. Gwelet zoken o konta istoriou pe o kana. En em gavet eo bet ganen sourpren kanaouenn a veur a vaouez e-kreiz c'hwennerez parkajou rabez gand re yaouank Lestrehone. Eun dra kaer-kenañ!

Er gêr ez oa ivez euz a fin miz mae da fin gouere amzer an hed gwenan. Delher a reem etre deg pe bemzeg kestad wenan da hoañvi. Diwallet oant war vein plad uhellaet diouz an douar evid tehed diouz ar merien hag al logod. Goude-ze ez oant goloet a hesk evel eul lostenn war gorre. Hag ar gestenn kurunet gand eun daouarhenn. Riskl ebed ken dirag an diësa gwall amzer hlao pe zoken a erh, e-doug an amzer-ze e leh ma kousk ar gwenan.

Gand heol an deveziou brao e kemeront adarre buhez e-leiz. Hag en em lakeont a-nevez d'al labour war ar poulzou nevez hag ar bleuñv. Ha peb kesten a roe daou pe dri hed gwenan. Ar re-mañ a gresk o niver beteg dreist ar pont-mên e skourradou ledan a wenan, da vihanna a-benn ar pardaez-noz. Hag eun devez, an oll bobl askelleg-ze a gemer he nij evid mond da zevel eur rummad nevez en eun tu bennag: eur hleuz dindan eur penn toenn, en eur wezenn gleuz gand toull neiz koz ar gazeg-koad. pe c'hoaz evid mond en eur gest nevez e kolo kinniget dezo. Pe n'eus forz petra all ha pa ve eur gestenn goad bet o lakaad soavon.

N'int ket diëz anezo, an intronezed-ze! C'hoaz eo red her hinnig dezo. Pe an hed gwenan, goude eun nij kenta hag eun diskuiz war eur skourr gwezenn-avalou, pe eun tamm gwezenn all, a guita... Mez evid mond, evid eul lamm diweza a-dost da eul leo a-wechou. Ha n'oa ket êz heuill ar rummad nevez. Klask a reem strafuilla anezo o skei a-daoliou kreñv war draou trouzuz evel eur vasin geur. Er memez tra, e skourrent marteze buannah evel-se.

Bez' e oa ar mare neuze d'o fedi da gemered perz er gest nevez: tos-

taad a reem daoust d'an aon kalz flemmadennou, eur gest goullou, war he hein dindan an hed gwenan. Ober a reem eur frap krenn war ar brank! Ar gwenan a goueze e-barz hag e tistroeh plên ar gest evel-se war he hann. Gortoz a rit ma vo kavet adarre ar peoh gand an intronezed, o vond e-barz azaleg neuze pe... o kregi adarre war ar skourr. Neuze e oa red a-darre eun hej all.

Diouz an noz e helleh poulza an hed gwenan er gest o kas dezañ maged gand eun dra bennag a ijinoh. Peurvuia goude beza bet e-barz e-doug eun nozvez, ar gwenan a deue d'en em lakaad da gemered eno o hêr. A-raog an heol mintin, ho-pezo douget ar gestennad etre ho trivreh, pe war ar hravaz beteg ar mên-pont, al leh kemeret evid ar gestennad nevez. Goude eo e teue labour sebezuz al labourezed-ze heb skuizder, a helleh chom da zelled bamet. Bez' en-doa a-wechou karget oll ar gest e daou viz e dri pe pevar-ugent lur mel gwiniñ du dreist-oll. Mez c'hoaz karget a hwez vad ar bleuñv brug hag ar poulzou pin. Ha bez' e oant ive avad kintuz a-walh hag e flemment a-wechou garo. Mez kement-se a oa atao evel eul louzou lakeet ennoh eneb ar remm! Hag ar mel n'oa ket da zilezel gand e zikour evid gounidegez bihan an tiegez.

Bremañ deom endro d'ar foenn.

Ar foenn a deue c'hoaz d'an traoñ dre or filhier braz beteg ar vrezel diweza: aze e oa ivez war-dro pemzeg deiziad labour e-touez ar starta evid an dud, hag a-wechou zoken evid eur... vaouez bennag! Azaleg peder eur vintin edod war-zao. Lemmet ar falh! Gouvellet war eun anne gand ar morzol wellaad, en deiz a-raog diouz an noz.

Pa oa falhadeg e ti pe di eh en em gave eur jao a eiz pe zaouzeg gwaz da droha foenn. Ar patron a gemere penn ar houch, nemed e ve ar mestrmevel. Dezañ da rei an trein, da jacha, da lavared eo da boulza! Pe er hontrol da rei amzer diskuiz evid lakaad eur hornad, zoken d'ar re na fument ket en oll! En deveziou-ze eo e teued da estimoud pep hini hervez e dalvoudegez wirion. Ma'z oa eur falher, ha n'eo ket n'eus forz petra, hag e kave aze eun notenn muioh evid e vrud a zen! Anez oa ar hontrol: eur falher dister! Ne gas ket ledan gantañ! E strev a zo moan! Pe an troh n'eo ket plad! Bez' emei e dent heskenn, pe c'hoaz an daou benn dibrad!

Neuze an dra-ze a helle digas geriou filpatuz, da vihanna a-dreñv e gein, dreist-oll ma'z oa dija en oad! Ar re yaouank da zeski, a veze lavaret dezo heb dizro ebed: —« Laka 'ta eun torch foenn dindan kazell da vreh dehoul» — « Moustr 'ta muioh war da falh!» — « Hemañ a laosko an hanter euz ar foenn war e leri er foenneg.» —« Da falh a zeblant dibiz! Ezomm he-deus euz eun taol morzol. N'emei ket re a-ratre, e stad vad da droha!»

Diouz eun tu all, e vezo meulet ivez gand geriou meuluz trein eur falher all: —« Da falh a zo eur razouer, paotr!» —« Dond a ra ganez! Bez' e vezi falher a-walh, gand eun tammig muioh a vleo dindan da fri! Pe pa 'po bleo kamm war da stomok! O paotr, karga a rez », da lavared eo « kemer a rez gwall ledan da strev!» Ar ger-ze ivez da lavared ne zell ket unan bennag euz e boan, hag e labour, e gwirionez evel ma ve evitañ e-unan.

'Vel just, evel-se, a-raog fin ar strev kenta er foenneg hlaz, an oll a oa c'hwezennet, da vihanna azaleg sav an heol. Boulha a zo bet greet gand eun debri war-dro peder eur hanter. Ha kerKent ha pemp eur e kiever an trouz kenta frot ar mein lemma war ar filzier. Aze ivez eo eun taol dorn da baka, ha skiant gouzoud zigas endro troh ho falh. —« Deski a ri o kemered diwar da goust!»

Da lavared eo ma ne lemmez ket a-zoare, e well da-unan, hag e klaski an tu mad. Da hedall e kousto dit muioh pe neubeutoh, hervez buanegez an taol a gemeri da lemma. E gwir, gand ar memez falh, an dra-ze a yee an hanter gweloh pe ouspenn, ma save kempenn neudenn droh ar falh, pe ma tizroe anezi oh ober eun ostill heb talvoudegez. Seblantoud a ra din an dra-ze en-doa kalz da weled gand or razouerou da lammad ar baro. Nemed ar boan, e-leh beza e gwirzienn ar vlevenn, a oa en ho tivreh, ho stomok, pe korn ho reor, falher dister ha dinerz!

Bez' oa dija evid an tu da lopa ho falh: ma laoskeh anezi teo, e trohe disteroh. Mez war eur heotenn galed, oa eur c'hoari vad. Ma lopeh anezi tano-kenañ, gand eur heotenn dener, e helleh mond taeroh an hanter ha teuler e-leiz foenn glaz war boutou an hini en ho raog dirazoh en ero all. Mez ar falh evel-se a oa koll toud... war foenn kaled pe c'hoaz karget a duriou gozed. Kollet oah, zoken o lakaad an hanter muioh a nerz hag a hwezenn eged ar re all. Heb konta ar goap a deue atao war muzellou lod!

War-dro eiz eur hanter, nav eur, ez eed da gemered eun dijuni mintin karget. Frigasenn viou, gwin, bara, amann, kig, soubenn, kafe... Hag ez eed endro d'ar foenneg. A-wechou d'ar mare-ze diouz ar mintin ez oah debret gand ar c'hwiibu: ar hoz traou bihan-ze a ree kement a drabas deoh oh en em fourra e peb leh d'ho tebri. Goude ez eent kuit gand kenta gor an heol. Diboaniet oah evid eun nebeud beteg hepken ma teue hemañ da skei ivez d'e dro warnoh gand e hor. Malloz deoh ma tizoloeh re ha re vuan er henta deveziou-ze a falherez. Bez' oah buan goloet kaer a daoliou heol strobuz ivez, ha pa ve zoken netra nemed war ho tivreh, pe war ho chouk.

Goude-ze e teue mern da greisteiz. Ha dija evid fin ar pred-ze, lod oa ponner o malvennou, dreist-oll ar re yaouank. Mond a reed da ober eur housk e peb leh en deiz-se. Lod a gouske dioustu, hag ar re all tamm ebed. Mez an oll a zo astennet en tu bennaq war al leton, war-dro an tiegez, pe war eun dornad foenn seh, e penn ar pez a jom euz bern kolo ar bloavez a-raog, ma ez eus dre vuzud c'hoaz... Pe c'hoaz er hreñj war eun tamm sah, pe eun dra bennag evel-se.

Da ziv eur, dindan an heol diborfil eñ ivez, al labour a grog adarre er foenneg. Pe, ar genta echu, ez eed da eun all. Deiziou kenta ar falherez-se a oa spontuz: kaoud a ree deoh beza freuzet ha diframmet ho mem-prou pe izili. Mez an trein vije dreist galloud da zerhel e-pad eur miz pe vuioh, bemdez. Hag a-nevez, ez eed war-zu ar pardaez: an trein aliez a skañvee, mez pas atao! Goulennit digand Fañch Kergov, pe « chacherien » all elveltañ!

Diouz an noz, am-eus va gwelet c'hoaz er foenneg da nav eur, abalamour ma felle d'an tieg ober « toud »! Bez' edom diouz an devez. Mez pebez devez hir! Chacha a oa greet warnom eur wech all. A-wechou evelato ar bae a oa gwellaet gand eun asskodenn. Mez n'am-eus gwelet kement-se nemed eur wech e c'hweh pe zeiz vloaz. Kalz ivez n'edont ket diouz an deiz mez hepken o rei an dorn en eun ti bennag evid ma teujod ivez d'o hêr d'her renta dezo goude-ze.

Ar peb brasa euz ar foenn a oa c'hoaz er foenneier gleb, douret e-doug ar goañv hag ivez an nevez amzer. N'oa ket eur foenn a dalvoudegez vraz evel ar foenn park hirio: eur heotenn hadet ha dibabet ha n'eo ket eur foenn gouez a zave evel-se e-unan! Chom a ree dister dreist-oll pa'z oa red e zastum c'hoaz gleb pe louedet kalz pe neubeutoh, ma ne oa ket gellet e zeha diouz ar gwella. An tammou foenn war douar park a helled da droha bremañ gand ar falherez dre gezeg. An dra-mañ a oa kalz gweloh. Ar merhed, nebeud deiziou goude ma chome an heol ganeom, a deue da zistrei ar foenn glaz gand ar wazed: d'e lakaad da zeha, d'e drei, d'e rodella pa vezo seh, ha d'e vernia a-galzennou, pe zoken a-verniou braz. Plijadur a veze ivez e-serr al labour, e-touez c'hwez vad ar foenn. Aze e reed troiou! Hag e veze takinet eur plah bennag. Da vihanna ma kreded!

Evid kas ar foenn sehet d'ar gêr e veze adarre gwall zeveziou: ar hirri gand rojou houarn a jome aliez el lagenn. Ar harradou foenn a groge a beb tu en hentchou don ha striz, dreist-oll ma oa kalz gwez koz war ar haou gand skourrou izel, hag a veze dibennet eun nebeud gand taoliou falz amañ hag a-hont. Red e veze lakaad daou loan penn-ha-penn, hag aliez tri!

Paotr ar fouet a dlee gouzoud c'hoaz e hent ha diwall da dreunia unan

pe unan euz e garradou foenn kercent karget. Evid ma'z aje mad al labour war a-raog er foenneg gand ar baotred o karga ar hirri, evel er gêr ivez. Amañ tri gwaz all, paotr ar bern, Tonton Paol aliez oh ober brao ar bern foenn, evid ar goañv da zond. Pa veze savet pevar pe bemp karrad, e tiskenne da deuler eur zell anaoudeg war ar mod ma kemere e vern evid rei dezañ ar hov a oa dleet evid beza eur bern kaer: ar bern a dlee kaoud da genta garr a-dreñv evid goude-ze ledannaad, mez heb kemered re a gov, mez eur stomok, hag erfin e tlee rabati war ront en eur hein dibikouez. An dra-ze oa an « teori ». A-wechou, paotr ar bern a helle beza « beuzet ». Neuze e ranked lakaad skorrou d'ar bern, ha pa ne ve nemed evid blenia ar bern en e ziazeez, ha da weled a-raog, evid henn ober goustadig.

Er foenneg bremañ e veze eur verh bennag o kribad ar restachou war-lerh ar baotred gand o ferhier hir a zaou viz evid tapa ar halzennou foenn en o fez. Da hed al harr goulou a... dreine abalamour ar charreter endoa bet abadenn gand e garrad diweza, chomet a-dreuz en tu bennag, e reed er foenneg ar pez a helled. Dond a reed da weled petra deue da veza ar merhed gand rastellerez ar restachou. Pe c'hoaz, mar doa tud yaouank oant, e c'hoarveze ma reed blejal, ne ouezer ket mad a-walh ma'z oa dre aon pe blijadur, o tostaad anezo euz ar houer, evid ober an neuz da drempa dezo o foñs en dour. Farserez groz marteze mez atao yah a-walh.

Eun nebeud sizuniou adarre, hag e teue an eost. Bremañ e klasked lakaad ar falherez dre loan da ober an dremen. Mez aliez c'hoaz, ar re goz a ree kailla, o veza ma ne reed ket labour fich a-walh, na kempenn a-walh: eul labour « mohet »! Na zouget ket resped a-walh evid noblañs ar bara da zond. Kement-mañ a hoarveze beb tro ma'z oa stoket an eost. Ha kement-mañ a hoarveze aliez, n'eo ket hepken dre ar re a dremp, mez ivez dre an amzer fall pe barr avelaj en-doa rozennet ha torret oll an eost en eur mesk estiammuz! Hozennet oll, da lavared eo kaset ha digaset war beb tu gand aveliou an eil goude eben disheñvel. Ni, ar re yaouank a argile. Mez evid ar re goz, an eost a oa din a resped braz. Anzavom n'oa ket en oll heb rezon.

E Koatoroh. Soaz an Dreff, dimezet da Fr.-M. Conq, ar wreg e fin an diweza kantved, pa groged gand an eost, a oa atao da genta er park: dezi, ar wreg, an enor da droha an dram kenta ha da ober dezañ eur bouchig leun a resped. Goude, gand an eosterien, eur bedenn verr. Mez ivez e vanne rom da bep hini, ar merhed evel ar wazed! Ha bremañ beh dezi! An oll, an eil war-lerh egile gand ar falz vedi, pep hini en e ero. Evel-se c'hoaz hanter-kant vloaz goude pa veze stoket an eost: ni a oa kroq en eost gand or filzier a-hed an deiz-pad.

Ha goude koan beteg pell noz e veze endrammet. Ha goude-ze sava-

dellet c'hoaz parkajou a-bez, beteg hanternoz. Ha dre ma teue ar gliz war beb tra ha ma ree ar melfed-krogenn o zroiou kenta aze war gorre. Diou pe deir atant a ree ar skouadrenn eost evid en em zikour evel-se heb ehan beteg ar harrad eost diweza da zorna en diweza ti. Neuze, an eil goude eben he-doa ar peurzorniou. Da lavared eo eur pred fonnu-soh, ha gweloh glebiet, evid lida an dra-ze evel ma tleed.

Bremañ al lid-ze a zalh atao, 'vel just, mez kalz traou a zo cheñchet: me gomz deoh euz a hanter-kant vloaz a zo. Pa helled medi gand ar falherez dre gezeg, ha pa deue bihan an tamm eost en e zav, e weled lapined o tifourcha. Strafaullet gand trouz ar falherez, e klaskent mond kuit dre douez an dremen hordennet. Neuze e veze redadeg a beb tu war o lerh na petra 'ta! Ha kri da helver ar hi zoken ma ne oa hini ebed er park, evid e strafailla muioh-mui, al lapin kêz! « Tie! tie! tie! » Hemañ a fourre e benn dindan eun hordenn bennag, ni a lamme warnañ a-dreuz-kov, hag e oa paket! Eur wech e-touez segal Gwaremm ar Vinell on-oo tapet seiz lapin brao.

Ha pa veze trohet toud an eost, e veze kroget da zorna. E Pont-Prenn e veze dornet c'hoaz dre gezeg beteg ar vrezel. Ar c'hweh loan a droe an dornerez hag ivez ar ficherez kolo, hag a fiche ivez c'hoaz kalzig o lostou gand ar helien lard war ar marhad! Ar greun a goueze gand ar pell war al leur. Ar rastell a 'z ee endro, da zibella. Ha kaoz kreñv e skouarniou ar re dosta daoust d'ar vouldinell, pe c'hoaz maneou braz a zivreh da ober sin. Evid echui ha lakaad ar hezeg da darda, ar boueter a zalhe an tamm e genou an dornerez d'he zafa. Neuze e teue eur barrad kaoz adarre el leur hag e veze disternet ar hezeg e-touez ar c'hwez kaoz-kezeg tomm ha taoliou penn ar hezeg o klask en em zizober euz ar helien lard. War al leur, c'hoaz ha jeu dreist-oll e Pont-Prenn endro da Tante Valentine. Goude ar rastell hag ar valaenn dibella, ar gronnou a vounte ar greun en e vern e-kreiz al leur. An ostill-ze, a veur a vod, a zervije en deiziou war-lerh da zispaka ar greun war al leur evid e graza en heol beteg ar par-daez, mesket gand an treid noaz a-hed hag a-dreuz.

Pa errue ar mor-ze a hreun war al leur, kement-se a oa saludet gand kalz a jolori gand killog an tiegez, heuliet gand toud e yer: « Kokoko! ko! Kokoko! ko! deuit 'ta oil war ar bern! » Hag ar vandenn da garga... beteg ma teue ar wreg da zichoual ar fraskellou-ze: — « Pest! Dichou!!! » Hag ar re-mañ da jacha kuit o klask lonka ar greun diweza ne fell ket dezo diskenn... Goude-ze ar voused a oa karget da zivenn al leuriad greun: ar pez a oa greet kempenn e-doug eur hard-eur, pe eun hanter-eur, mez goude kollet an evez, ar jao a deue endro beteg eur blej all o hase a-nevez kuit.

Ni a oa karget da weski al leuriad. An dra-mañ a reem o ruza on treid noaz er greun oh ober roudennou kaer gwech a-hed, gwech a-dreuz, ma n'oa heb ehan, da vihanna a-liez a-walh. A-benn daou pe dri devez kraza ar greun-ze en heol, ez oa seh-kenañ zoken. Neuze e vezo kempennet en nizerez. Ezomm ebed ken da vond en ode avelet bennag evid e strinka en êr evid ma kouezo en ho kichenn muioh pe nebeutoh diboul-trenn ar pell hag an douar kaset dioutañ gand an avel, pelloh.

Karget eo e seier. Savet e vezo war skoaziou ar wazed. Hag ar re-mañ e gas dre skalierou strakuz beteg galateziou an tiegez, pe c'hoaz ar grignolou braz da lakaad greun, hag a zo e kein meur a wele kloz en ti pe da vihanna er greñchou. Aze bremañ, e vezo ivez red e ziwall diouz al logod hag ar razed zoken. Pa n'oa ket ar minouhed!

Pa'z eo ar greun klozet a-gostez, ez eer war-dro ar berniou kolo: peillet e vezo ar berniou evid na vo ket mui a golo laosk, mez bordou nêt. Renka a reed a-nevez ar hein war ront, evel ivez kein ar bern foenn, laosket evel-se abaoe penn kenta miz gouere. Ober a reed amarrou kolo dre zousenn evid o lakaad war ar berniou kolo ha foenn, muioh evid o diwall euz aveliour ar goañv ha gwall-amzer eged evid ar glao e-unan.

Pa deue miz gwengolo ez eem d'ar gwiniz du. Trohet oa ivez aliez gand ar falz vihan ha gand kalz a boan gein. Savadellet a-zrammou ledet brao endro d'ar penn-glin war ront, hag e teheh evid he hloza en he sav evid seha brao, evel eun deltenn vihan ha ront. Aliez a-walh ivez ar gwiniz du dornet ne graze ket brao-kenañ war al leuriou, atao glepet gand ar glao a deue re aliez. Neuze dreist-oll, oa red-mad embleudi ar greun en eur hreñch bennag.

Galvet e veze ar re yaouank hag ivez ar re goz da zond da zañsal war ar greun e-pad eur pennad devez goude mern. Ha ne ehaned nemed diouz ar pardaez pa oa deuet ar greun ganeom da veza flour-kenañ dindan on treid noaz. Embleudi a oa evel eur gouel laouen leun a hoarz hag a blijadur. Ar gouel-ze on-eus bet meur a dro gand bugale Milin Gerbrieg en or hêr e leh ma ree on tad kalz eost du, hag e kêriou all evel e Koat-houarne.

Kolh ar greun a dlee beza kaer ha luian evid kaoud ar bleud ar finna. Nag a ebat en or horollou dorn-ha-dorn o vresa ar greun. Pa veze greet a-walh e veze kafe ha kouign evid an oll ouz taol. A-wechou zoken al labour-ze a veze greet ivez gand sikour paioiu eul loan. Neuze avad oa red karga eur paotr seder hag ampart, gand eur boutog etre e zivreh da vond da heul on « dañser » ha da zastum piz peb tra... ma c'hoarveze d'hemañ sevel e lost... evid kreski ar bern greun! N'eus gwelet c'hoaz den ebed oh ober bleud gand kaoh-kezeg!

L. Conq

(da veza kendalhet)

Geriou:

fichoh: *gand muioh a breder, koantoh, kempennoh.*

tumper: *an alar « poumper » e leh all, hag a zigase an douar don war gorre, war-lerh labour ar higner.*

Hadeureujou: *haderezou.*

Brabigner: *alarou e mod nevez, hag a laboure, unan euz ar seier o vond d'eur penn d'ar park, eben o tond endro: ar « brabanou »!*

Turiou gozed: *turiadennoù gozed e-touez ar foenn.*

strobuz: *an taolioù heol a rente diêsoh al labour, hag a liamme ahanoh...*

diborfil: *divorfil, dihun, beo ha birvidig.*

treunia: *troholia.*

grounnoù: *benviachou greet evel ar rozell da leda kaot ar hrampouez war ar billig, mez amañ evid leda pe zastum ar greun da graza war al leur.*

fraskellou-ze: *ar yer oh ober cholori ha savar, pell amzer goude beza kaset da bourmen diwar al leuriad greun.*

embleudi: *ambleudi, bresa ar gwiniz-du evid e graza.*

kolh: *golo ar hreunenn.*

luian: *lintruz, flour ha diboul-trennet.*

Leor ar miz

Fañch Broudig

**Al liberterien
hag ar brezoneg**

« Brug » 1913-1914

Eur studi hag eun dibab a bennadou

284 p. 42 lur (400g)

Etre Bourdel ha Breiz: Enez-Heuz, e amzer Loeiz XIV

Hag anaoud a rit **Enez-Heuz** (e galleg : île d'Yeu)?

Hervez an douaroniezh ez eo eun tamm euz ar Venezieg arvorigad. N'eo ket gwall vraz: 2.300 hektar, 7 km war 3. N'emañ ket pell diouz an douar-braz: eun eurvez bag euz ar Vañde. A-raog 1789, e oa eul lodenig euz ar Poatou-Izel, ha tostig-tre ouz Breiz. Ar porz brasa a oa anvet Port-Breton. (Hirio: Port-Joinville).

*
**

E penn kenta mareou Loeiz XIV, he-doa da intron markizez Assérac, euz Bro-Naoned. An intron a oa mignonez da Foucquet, an Arhantour braz. Ar ministr, savet aon ennañ ablamour da enebiezh ha tamallou Colbert, a lakaas sevel kreñvlehiou, da genta er Gerveur - hag a oa en e zalh - hag ivez en Enez-Heuz. Med toullbahet e oe a-raog dond abenn d'en em repui enno. Hag eur Holbert eo a zeuas da veza perhenn an enezig a-barz pell. Ar pezh na gemmas netra e buheze euz.

Peogwir e veze ar wazed war vor, ar merhed eo a labourer ar parkeier, bihan-tre peurvuia - konta 'reed zoken dre « ero ». Evel e inizi Breiz, nebeud a wez, med banal, o veva en o zouez kezeg bihan demouez. Diouz ar pezh a zo bet kontet, e oant deut eno da heul komandoned breizad: marhikaned evid korriganed!

Ar pezh a zo sur a-vad, unan euz famillou brasa an enezenn e oa ar famill Drouillard, a gaver roud euz heh ano en istor Breiz. Med n'ema ket war ar roll savet gand F. Gourvil en e **Noms de famille de Basse-Bretagne** (1966). Bez' ez euz a-vad eun ano all: Cadou, anavezet mad

eno hag en or bro. Ha pa lenner kartenn Heuz, e kreder beza e Breiz-Izel, gand « kèriou », heb menegi anoioù an tier-hañv. N'eo a-vad nemed eun distresadenn, dindan « levezon ar brezoneg », euz « quéri », a dalv, e « galleg » ar vro: leur voutin er gêniadenn.

*
**

N'eo ket evid displega an traou-ze e-neus **Jean-François Henry** savet e leor: **Des marins au temps du Roi Soleil** (1). Med evid diskouez eun dra dihortoz a-walh: pouez braz-kenañ an enezig e kenwerz gwin Bourdel en amzer-ze. Rag martoloded Heuz a oa neuze ar vrasa « frikerien-kranked », pe aocherien, etre Bourdel, Breiz ha broioù an Norz. Pesketa 'reent e-pad an hañv, med euz miz here da viz mê, e vezent war vor gand o listri bihan - etre 10 hag 50 tonnell. Mond a ree lod anezo da glask fred e Naoned, med ar peurvuia a ziskenne war-du Akitia da lestra barrikennadou gwin Bourdel. A-wechou o hasent beteg Rotterdam, en Izel-Vroioù. Chom a reent tost ouz an aochou, da helled kaoud aior ha repu pa veze re fall ar barrad-amzer, pe c'hoaz pa welent o tond warno « kourserien » pe breizerien-vor.

War rollou porz Bourdel, e 1698-1699, e konter 177 bag euz Enez-Heuz, bet eno o lestra gwin. Redon ha Naoned eo ar porzioù breizad an da-rempreta ganto. War-lerh emañ Sant-Malo, Montroulez, Brest, Kemper, an Henbont, Gwened, an Alre, Sant-Brieg, Bourh-Nevez-Rez, Douarnenez.

Hiniennou a zilestr er Poulligwenn, ar Hroazig, Pont-Aven, Konk-Kerne, Rosko, Kastell-Paol, Kameled, Pont-'n-Abad, Kraon, Meil-ar-Wern, Landerne, ar Faou, Konk-Leon, Lanuon, Dinan, Landreger, Pontreo. N'eus ket ano euz Inizi Breiz, nag euz Pennmarh. (2).

E Breiz, e reent eur hard euz o henwerz gand porzioù norz ar vro, hag an drederenn gand re ar hreisteiz. E Redon, e 1698-1699, e konter 54 bag euz an Enez-Heuz o tond euz Bourdel. Bourhizien Roazon a dlee priza gwin Akitia! Ne oa nemed 8 bag o tilestra e Pont-'n-Abad! Estreged ar gwin, e tigasent ganto ocivi, rousin, ter, butun. An tri hard anezo a zistroe ez-houllou. Ar re all a lestre amann euz Montroulez, lien, moru dizehet. E porzioù ar hreisteiz e samment koad-prenn, hollen, sardin.

Bihannoh peurvuia, ar bagou a lohe euz Naoned a zarempred dreist-oll kreisteiz Breiz, o tigas ganto gwin ar vro. (Ne reed ket ano c'hoaz euz muskadig). Distrei a reent gand ed (segal, gwiniz, kerh, heiz), hag hollen euz paludou Gwennran.

*
**

Da skwer, setu amañ diverra beaj ar « Sainte-Anne ».

D'an deiz kenta a viz meurzh 1692, e kuitee Bourdel, evid mond da g-Calais. Eun arsao a reas er Rohell, evid beza renket. He mestr a zammas eno gwinegr da gas da Vrest - heb aotre e « vourhiz » (perhenn ar vag). Emichañs evid pèa ar mizou! E Sant-Nazer, e prenas bara, kig, irvin, amann, koad, lien ha rouejou; e porz-Loeiz, e prenas bara; e Brest, bara, pesked hag amann; e Kameled, gwispid, amann, kig, sardin, moru ha kaol. Eno ez a an oll d'eun overenn goulennet ganto evid ma vefe brao ar veaj evito hag evid ar vag. En Aber-Ah, e prenas pesked; e Perroz-Gireg, amann. En eur zistrei euz Calais e prenas bara en Enez-Vriad, bara ha kig e Rosko, bara e Porsall; bara, kig, kaol, irvin ha goulou rousin e Kameled. (Ar patatez ne oant ket anavezet c'hoaz er vro). Echui 'reas ar veaj er Rohell, d'ar 24 a viz genver 1693.

*
**

Eur wech bennag ez eus bagou hag o-deus da vestr eur Breizad, evel Fañch Cauzic, Herve Lostu, Fañch Le Cam (3). A-hend-all, Job Keraneau, euz Kemper-Corantin, d'ar 6 a viz mè 1688, a gemer da vestr war e vag eur martolod euz Enez-Heuz. Mikael Pérot, d'ar 14 a viz even 1687, a ra marhad gand Fañch Guérin, mestr « Le Charles », evid ma tigas dezañ, e Brest « en Bretagne », mein-benez euz ar Saintonge. D'an 2 a viz c'hwevrer 1701, Per Orsonneau, euz Enez-Heuz, a ra sevel eur vag a 30 tonell e « stêr Kemperle ». Rag n'ez eus ket a goad-prenn war an enezenn; setu perag e oa dao sevel ar bagou e leh all, dreist-oll e Kemper, Kemperle, porziou ar Mor-bihan, ar Roh-Bernez, Naoned, Pornig, Bourh-Nevez-Rez.

*
**

C'hoarvezoud a ree gand Breiziz dond d'an Enez-Heuz evid abegou... displijuz-tre. Da skwer, Yann Le Rue, mestr « Le Bernard », euz Konk-Leon, o kas da Vourdel 36 tonellad gwiniz ha segal, a rank porzia en enez war urz groñs eur fourgadenn spagnol, evid digas da homañ priz daspren eur mestr-bag heuzad bet paket gand ar « hourser ». Kemend-all gand J. Fardel, o tond euz Gwened, ha gand eur vag euz Kiberen.

Bagou breizad a reas peñse war aochou dañjeruz Enez-Heuz. E-pad ar mareou-ze, unan euz pep hini euz ar porziou-mañ: Montoir, Kiberen, an Alre, an Henbont, Moelan, Gwaien, Konk-Leon, Montroulez, Sant-Malo.

Breiziz a zeue ivez d'an Enez-heuz evid o aferiou: Yann Bizeul, euz Naoned, da brena eul lodenn vag; Loeiz Maureau, euz ar Gerveur, da droki e vag ouz unan euz an enez; Paol Milhory, euz Sant-Malo, ha Job Kerineau, euz Kemper, evid ober marhad. E 1742, Olier Lapartient, mestr-bag euz Sarhaù, a lak e vab Bastien da zes kard e ti « surjian » Port-Breton. Priz: 300 lur evid an daou vloavez.

*
**

Nebeud euz merhed an enez a zimezas gand Breiziz; konta 'reer daou vartolod euz Sant-Malo hag a zo bet eureujet eno. Eur wech bennag e troas an traou da fall evid eun Heuzadez yaouank. E penn kenta 1692, eur Simon Masson, euz an enez, e-noa prometet dimezi gand Anna Pruneau, Heuzadez. Roet e-noa dezi zoken eur japeled hag eul loeiz aour. Med an Heuzad a gavas gwelloc'h e Brest; hag e miz gouere e oe greet an embannou kenta en e barrez en enez. Kerent Anna a zavas droug braz enno hag a glemmas dirag o ferson ha lez-varn an eskopti, evid ma vefe divennet ober an dimezi etre Simon hag e Vreizadez.

Eur Breizad bennag a zeuas da labourad en Enez-Heuz, evel an daou galvez-amunuzer Jorj Le Brisval ha Yann Le Goff. Jorj ne reas ket fortun eno, peogwir, e 1709, ema war roll ar beorien da veza kaset kuit euz ar barrez. E 1711, a-vad, edo atao en enez.

Eul lodenn vad euz ar gwiniz he-doa ezomm Enez-Heuz a veze prenet e porziou Breiz. Ouspenn, eneziz, dre vagadou, a zeue da brena a beb seurt traou e marhajoù Pornig ha Macheoul « en Bretagne » (1772). Da heul an daremprejou-ze, eneziz 'zo a reas o annez e Pornig, ar Hroazig, an Alre, Kemper, Kemperle, Gwaien, Sant-Malo. Unan anezo, Charles Drouillard, euz Montroulez, distroet d'an enez da weled e gerent-chou, a hloazas, war-lerh eur pred mad, kabiten gwarded Heuz, hag e oe galvet da vond dirag lez-varn ar gouarnour, d'an 22 a viz c'hwevrer 1678.

*
**

Bez' e oe ivez daremprejou relijiel etre eneziz ha Breiz. Jorj Le Guédec, goude beza bet person eno betek 1663, a oe anvet da berson en Assé-rac. Yann Mesnard, person Heuz etre 1682 ha 1697, a oa euz Naoned. Daou dad kabusin: Aogustin, euz Pont-Skorv, ha Timote, euz Ploermel, a zeuas da brezeg eno. Med, dreist-oll, ar misioner roazonad brudet, Loeiz-Vari Montfort, a reas eur mision e-pad koraiz 1712, evid mad « chovajed » an enez, diouz ma skriv Grandet e buhez ar zant. Eur

hantik koz, savet en e enor, a zo war don hini Sant-Erwan Landreger.

Tud an Enez-Heuz o-doa eun devosion vraz e-keñver Santez Anna. Adaleg 1627 ez eo brudet Keranna en enez. E leor burzudou Santez-Anna-Wened, e lenner penaoz, ar bloaz-se, seiz martolod heuzad, paket en avel foll hag ar mor diroll e stêr Bourdel, a zeuas gand kalz a zoujañs da zigas da Geranna kerdin o bag, soveteet adaleg dezo prometi dond d'al leh santel gwenedad. Ar bloavezh war-lerh, kure an enez eo hag a zeu da drugarekaad Santez Anna da veza pareet anezañ trumm. Etre 1635 ha 1682, e konter seiz burzud all greet gand ar Vamm-Goz evid sikour martoloded heuzad. Unan euz ar re-mañ, Yann David, a reas war e dreid noaz an hent etre porz an Alre ha Keranna da ginnig da « batronez ar voraerion » banniel e vag. Merhed ivez, evel Renea Turbé hag Anna Drouillard, a zeuas da drugarekaad Mamm Mari.

*
**

Ouspenn istor an daremprejou-ze e fin ar XVIIved kantved ha penn kenta an XVIIIved kantved, e kaver el leor-ze meur a dra resiz diwar-benn buhez eneziz, studi ar boblañs, stumm ar bagou, enebiez ar vartoloded ouz ar zervij war listri ar Roue. N'eo ket istor ar pennou-braz, med hini ar bobl eo hag a zo displeget brao ha sklêr gand J.F. Henry.

K. Riou.

(1) Embannet gand Yvon Salmon, La Chauvelière, 35150, Janzé.

(2) E 1533-1534, en Arnemuiden (Izel-Vroïou) e porzias 122 bag gall ha 815 lestr breizad; e-touez ar re-mañ e oa 270 euz Pennmarh! Med, La Fontenelle a rivinas Pennmarh e fin ar hantved.

(3) An anoïou-tiegezh a zo skrivet evel m'emaint war baperiou noterien Enez-Heuz d'ar mare-ze.

Kavet e vez **Brud Nevez** da brena e ti:

Ar Bed Keltieg, ru ar roue Grallon, Kemper.
Gwalarn, ru des chapeliers, Lannuon.
Breiz, 10, rue du Maine, Paris.
Breiz, 17, ru Pennhoet, Roazon
Kornog, 22, ru ar Vur, Montroulez.

Brezoneg ar mor: hini al leoriou pe hini an dud?

Anaoud a reer ar studi e-neus greet **Per Trepos** euz ar geriou a reer ganto en tiegeziou hag en atanchou (1). Med a-benn ar fin, n'eus ket kement-se a studiadennoù diwar-benn ar geriou brezoneg a ra ganto an dud a vicher, pa vezont war o labour. Dedenusoh a ze eo an hini a ginnig **Loeiz Andouard**, evid an eil gwech dija, diwar-benn **Brezoneg ar mor** (2).

Dindan stumm eur geriadur galleg-brezoneg eo e-neus savet anezi, ha pourchas e-neus greet deom eul leor a 135 pajenn, gand skeudennou o-barz, hag a vo prisiusoh a ze pa ro skweriou war-lerh an oll heriou pe dlost. An neb ha n'eus ket anezañ eun aryonad a dalvezo dezañ, se 'zo sur, med memez da dud a vor e hell ober. En eur zoñjal er baotred hag er merhed yaouank a vez niverusoh-niverusa o vageal e bourz bigi-pourmen, eo e seblant L. Andouard beza savet e heriadur. Diêz eo kredi koulskoude, en em lakfe en eun taol an oll yaouankizou-ze da vrezoneg war vor. Beteg-henn eo ar vartoloded a beskerez eo a ra ar muia c'hoaz gand ar brezoneg, anad eo.

Amañ, dres, eo ema an dalh, evid pezh a zell labour L. Andouard. Dis-

plega a ra e-unan en e raglavar, e-neus dastumet « hepken » ar geriou bet implijet dija. Med ar geriou-ze eo « hepken » ar re e-neus kejet ganto e-kerz e lennadennoù. Gand se, eh anav n'e-neus ket greet a enklaskou (pe nemeur) e-touez an dud, e-mesk ar vrezonegerien a orin, da houzoud peseurt geriou a reent ganto bemdeiz-Doue. P'e-noa **Alan ar Berr** studiet an anoïou-pesked, eo ze e-noa bet greet da genta hag a-raog peb tra: mond a borz da borz da gleved digand ar vartoloded o-unan penaoz eh anvont ar pesked (3).

N'eo ket evid se n'e-neus ket labour L. Andouard a dalvoudegezh. Fonnuz eo ar geriou e-barz, ha war-lerh ar beurlvasa anezo, e ro eta skweriou niveruz. Se ne vir ket e vije evezadennoù d'ober war veur a boent.

Penaoz, da skwer, termen, e-keñver implij, talvoudegezh ar geriou a vez kinniget gantañ? Darn, eun trugent bennag diouz ar pezh a lavar, n'int ket diêz da anaoud da nebenta, eo ar re e-neus lakeet eur steredennig dirazo, hag a zo geriou nevez bet ijinet gantañ. Kinnig a ra evel-se « golo » evid « capot », « golo-red »

evid « capot coulissant », « azezenn » evid « banquette », « mouger-tan », evid « extincteur ». Bez' ez int a-dra- zur geriou a hell tud a vicher - ha re all ivez - kaoud an ezomm diouto, ha lavared a heller n'eo ket savet fall ar re-mañ meur a dro. Ma vije savet an oll heriou nevez, a ginniger deom ken brokuz a-wechou, en eun doare ken eeun, e vije ez a-walh digemer anezo moarvad. Med amañ eo ema an dalh, just a-walh. An oll heriou all, eo pennaoui anezo en eun toullad mad a skridou a beb seurt e-neus greet an aotrou Andouard.

Setu, pa'z eo diazezet e heriadur war e lennadennou, ha p'eo bet ar re-mañ koulz ar « Sketla Segobrani » ha « Bilzig », n'eus tu ebed d'ober an diforh etre ar geriou hag a vez implijet e gwirionez gand ar vrezonegerien a zo tud a vor anezo, hag ar genou lenneg bet implijet abaoe hanter-kant vloaz gand hemañ pe henhont. Pe da vihanna, n'eo ket ez ober an diforh, rag er memez doare ha gand ar memez talvoudegez, eo digemeret « defañs » evid « défense », « labouradeg-pesked » koulz ha « fritur » evid « usine de conserves » hag « arouezva » evid « sémaphore ». Heb ma vefe disklênet bewech euz a beleh e teu an eil ger hag egile. A-wechou e vez greet, hag eo mad-tre. Med ne reer ket beb tro. Eur wech bennag e lavarer ivez e peleh e vez greet gand ar ger-mañ-ger, med ral a-walh. A-bouez eo kement-mañ koulskoude, rag cheñch a hell ar geriou euz eun eil leh d'egile: ar ger « tevenn » da skwer, eo mad gouzoud e talvez kement ha « dune » e bro-Leon.

O veza savet danvez e heriadur diwar e lennadennou hepken, hag o veza chomet heb derhel kont eur ar yez komzet, eo tremenet L. Andouard a-gostez euz meur a dra moarvad. Eun nebeud skweriou all, ke-

ment ha beza ganti. Pesketerien Mogerieg, pa gomzont euz ar « hevnid » emaint o tond euz a besketa, n'eo ket euz « morgevnid ». Re anad eo evito e teu o hevnid euz ar mor, ha bepred e vez tu da houzoud dre ar h/« contexte ». Diouz red, eo deuz « kevnid-mor » eo e vo komzet, n'eus forz penaoz (4).

Evid « armateur », ne ginniger nemed « paramantour »: euz « armatourien » eo e komz aliez-mad an dud a vicher. Er memez doare e komzont euz eur « hanot » pe euz eur hanot-sovetaj (gand ar pouez-mouez war « ve ») ha n'eo ket bepred euz eur « vag-saveterez ». Ar ger « hauban » a droer gand « kordenn-wern » pe « skeul-wern », p.63, ha ne gomzer ket deom euz an « obantou » a oa bet kaoz anezo eun nebeud pajennou a-raog, p. 33. Peogwir e tigemered « batiskaf », « brig », « fok » hag all..., perag beza ken pismiguz ha klask beza ken glan a-wechou all?

Heb diêzantant, e lavarer deom e hellom ober gand « Kab Horn ». Med « Beg-Douar Frehel » a vije sañset deom da lared a-hend-all... Ha red e oa poania da drei « Gulf-Stream » gand « Froud-veur amerikan »?

Da evezriadennou all e tigas kement-mañ ahanom. A-wechou e vank an droidigez halleg euz ar geriou pe euz ar frazennoù a ginniger deom: evel-se ema kont, da skwer, war-lerh ar geriou « amer », « goémon » ha « maerl ». Eur brezoneger ne gavo ket diêz, med eun deskard a ray. Ha n'eo ket dresiz ivez an droidigez eur wech bennag? « Koz vartoloded », moarvad, n'int ket « martoloded koz » (p.77). Eun dra bennag a zeblant mankoude pa droer « la mer était toujours agitée » gand « e veze birvil gand ar mor » nemetken (p. 12).

Gwir eo e vez mankou dalhmad en eur geriadur, ha ne heller ket re-bech kement-mañ euz an oberour. Dre zigouez, on kouezet, pa oan o lenn leor Andouard, war eur « glossaire des termes courants de vocabulaire marine », euz ar seurt a vez roet gand ar « Marine Nationale » d'ar voused pe d'an danvez-martoloded er skol: kaer e-neus hemañ beza bihan, a zo kalz a heriou enañ ha n'emaint ket e geriadur L. Andouard. Med gwir eo ar hontrol ivez.

Evidon-me, em-eus notennet buan ha buan eun nebeud traou hag a vanke, a gav din, e **Brezhoneg ar mor** Ne reer ket an diforh etre an « istr don » hag an « istr plad », da skwer. Klevet em-eus bet ivez komz euz « mond war ar zeh » evid « s'échouer ». Gand eun enezennour a Sun, em-eus desket ar geriou « arah » evid « étale de basse mer » ha « distilan » pe « distilandi » evid « étale de haute mer ». Pa'h ouezer e-neus **F. Vallée** resisaet an droidigez euz ar galleg « bruit » war eun hanter-bajennad euz e heriadur braz, e vije bet mad moarvad kinnig ousspenn « mor-drouz » evid « bruit de la mer », rag bez' e hell trouz ar mor beza kan, roz, grozml, saflik, bourbouill...

Ar pezh e-neus souezet ahanon ar muia avad, eo n'e-neus ket dalhet kont L. Andouard, war a zeblant, euz unan euz al labouriou pouezusa a vije bet greet war e dachenn koulskoude, eo himi **Alan-Gwennog ar Berr** diwar-benn an anoiou-pesked (3). N'eo ket hepken e-nije bet greet enklaskou en oll borziou-mor a Vreiz-Izel, med tro e-neus bet da ginnig a-raog e varo eur « systématique » diazezet war eun dro war an enklaskou e-noa greet ha war studi ar skianchou naturel. A-wechou n'en em gavan ket a-du gand an diskoulm a ginnig, da skwer pa houlen e vije an-

vet ar hregin Sant-jakez, (kaer e-neus ar ger-mañ beza muioh anavezet hag êsoh da intent evid an oll), « kalipez » (a zo brao a-dra-zur, med ne vez implijet nemed en eun nebeud porziou nemetken). Med evid eur wech m'on-eus bet unan bennag o studia en eun doare piz ha skiantel ar geriou brezoneg a reer ganto d'envel ar pesked, ne welan ket perag ne vije ket digemeret e ginnigou eur wech da vad.

Padal, ne ro ket L. Andouard ar memez troidigez hag Alan ar Berr, meur a wech: « bar » a zo « braog » hervezañ, p'eo « kloian » evid A. ar Berr. A-wechou all, e vez notennet meur a her brezoneg gand L. Andouard evid ar memez pesk. Gwir eo e cheñch an anoiou-pesked euz eun eil porz d'egile, hag henn diskouezet mad-tre e-neus Alan ar Berr en e dezenn. Ha ne oa ket dao, avad, la-kaad eun tammig urz? Ha digemer neuze geriaoueg ar « systématique » savet gand ar Berr? Pe neuze displega mad e peleh e vez implijet ar ger-mañ-ger « Baudroie » a hell beza « mordouseg » pe « boutouz » evid an aotrou Andouard: evid Alan ar Berr, n'eo nemed « boutouz ».

A-wechou all memez, e talh L. Andouard da faziou hag a zo bet reizet koulskoude gand A. ar Berr: atao eo « glizigenn » « anchois » evitañ (evel 'barz geriadur **R. Hemon**) e-leh beza « ginou-gamm », « glizigenn » o veza « sprat » e gwirionez. « Spineg » n'eo ket « grande roussette », med « aiguillat ». « Crevette » a zo « cheor ». Derhel a ra L. Andouard da ginnig « angell » evid « nageoire » p'e-neus displeget Alan ar Berr en eun doare sklêr-meurbed diwar enklaskou e vez greet e peb leh gand « askell ».

Penaoz e-neus greet an oberour

a-hend-all da zibab e anoio-pesked? Rag mankoude a ra eur bern en e roll, hag a-wechou e-nije bet tu da veza klok ha resiz, diwar labour Alan ar Berr bepred, ha n'eo ket. A beb seurt kranked a zo, da skwer: kranked-glaz, kranked-Portugal, kranked heb ankounac'haad ar chichalved, « étrilles ».

Kement-mañ a ra deom en em houlenñ peseurt doare geriadur euz brezoneg ar mor e-neus c'hoanteet sevel an aotrou Andouard. Ha felled a ree dezañ embann eur geriadur diazez? Med dileet e vije bet dezañ neuze ober dibabou etre ar gerioù a ginnig (5), lakaad eun tammig urz e-trezo, derhel d'ar memez reolennoù dalhmad, hag èsè beza ar reisa posubl bewech n'eus forz penaoz. Ha klasket e-neus beza klok? N'eo ket deuet a-benn, ha n'eo ket eur geriadur « skiantel » e-neus savet.

E fin e dezenn, e poueze Alan ar Berr war eur menoz a oa bet displeget araosañ gand Littre: « l'usage contemporain est le premier et le principal objet d'un dictionnaire. C'est pour apprendre comment aujourd'hui l'on parle et l'on écrit qu'un dictionnaire est consulté par chacun ».(6). Hag e tisklêrie ervad ne dleje ket beza savet eun « thesaurus » euz ar brezoneg heb derhel kont euz yez ar bobl.

Ne oa ket L. Andouard o klask sevel eun « thesaurus » sur a-walh. Med war veur a boent eo chomet e-tre daou. Arabad kredi evelkent n'eo ket gouest **Brezhoneg ar mor** da renta servij, hag e ray. Dija e tle beza bet eun tamm mad a labour sevel anezañ. Gand ar hiz a zo d'an traou a vor, n'e-nevo ket a boan o werza buan eur bern skwerennoù anezañ.

J.S.

(1) **Le vocabulaire breton de la ferme** Nevez adembannet gand **Brud Nevez** (n'eus ket ken. A vo adembannet)

(2) **Brezhoneg ar mor** Embannet gand **Hor Yezh**

(3) **Alan-Gwennog ar Berr. Ichthyonymie bretonne** Embannet gand **Skol-Veur Vrest**

(4) **Alan ar Berr**, p. 146 euz an trede levrenn.

(5) Eur skwer vad a gement-se, eo an troidigeziou a ginnig L.A. evid « thon »: da genta « toun, -ed », ha war-lerh nemetken: « ton, -ed ». Med diwar Kervella e skriv memestra « ton **plutôt que** toun ». Eur wech da vad e oa bet barnet an afer gand Alan ar Berr, pa zisklêrie ne veze distaget « toun » nemed en eur porz hepken. e bro-Leon, ha pa n'eo bet skrivet ar tumm « tounn » nemed en eur geriadur euz 1744 a-raog beza e geriadur Roparz Hemon. « C'est faire la place bien grande à un particularisme léonard, limité, et qui ne présente aucun intérêt fonctionnel », eme Alan ar Berr, gand rézon, p. 161 euz e drede levrenn.

(6) Idem, p. 161.

Bleun-Brug

Dilun, dimeurz, dimerher...

Rimadellou nevez evid ar vugale

20 lur (200g)

Ar zantimañchou: ha bez' ez eus anezo c'hoaz?

Emaom e 2050, e **Cafflogion**, e hanternoz Bro-Gembre, e-kreiz ar menezioù, ar hoajou... hag an deñved. Ar **Geoded** dianav-mañ a zo bet savet war-dro ar bloavez 1990, gand **Ieuan** hag an Daouzeg, tehet diouz **Stad ar Gêrveur**, e kreisteiz ar vro. E Cafflogion e veve, di-arme, er frankiz, e-touez mignoned dezo, a-vad, ar gwir da lared o zoñj diwarbenn peb tra. Heulia 'reer al lezennoù a-viskoaz, heb ober fae war an arakadennou ha na flastront nag an den nag an natur. Beva 'reer, e gwirionez.

Er hontrol, er **Gêrveur** ez eus eur **Stad**, peurgempennet, peurreizet, dezañ an oll wirioù, hag hini ebed da Gêrveuriz. Ar re-mañ a zo bouetet, diduet, heb ma vefe goulnnet morse diganto o zantimant. (Ar zantimanchou ha bez' ez eus anezo c'hoaz?). Ar pez a gont eo labourad, evid gounid muioc'h buannoc'h, dre gas atao war-raog ar mekanika, dindan spierez diehan an Arme Guz hag heb ordinarionen fri-furch ganas.

Daou véd eta, ha ne vefe sañset etrezo nemed eun eurvez helikopter; e gwinonez ez eus eur beurbadelezh etre Cafflogion hag ar Gêrveur. An daou véd-se a gav dezo beza tizet ar zevenadur uhella. Kêrveuriz n'anavezont netra diwarbenn

Cafflogion. Med er geoded-mañ ez eus tud a gred e vefe mad diskouez da Gêrveuriz penaoz ez eus tu da veva euruz, er frankiz, o labourad heb koll na personelezh na levnezh.

A-raog staga gand an daremprejoùze, e-neus Ieuan goulnnet o ali digand e zaou eiler yaouank: **Meic** ha **Steffan**. Hemañ ne gred ket e vefe eun dra vad evid Cafflogion rei da hould ez eus anezi war an douar, gand aon da lakaad e fulor renerez ar Gêrveur, hag a vefe gouest da vruzuna ar geoded en eun taol-kont. Ieuan erfin a houlenñ digand **Alun**, dimezet gand **Mair**, ha tad da z-**Sion** eur paotrig tri miz (kenta bugel trede rummad ar geoded), mond d'ar Gêrveur, da bedi **Garth Prince** da zond da filma buhez Cafflogion. Garth a zo brudet evel saver filmou tele. Asanti 'ra Garth: evitañ, se a zo eun avañtur euz ar henta: distrei d'ar béd a-wechall! Pebez « scoop »! Dond a ra da Cafflogion, el leh ez eo digemeret ken brao ma teu da gaoud dispar ar pez a glev hag a wel. Hervezañ, e film a ray berz spontuz war skrammoù bihan ar Gêrveur.

Distrei 'ra d'ar gêr evid diskouez ar rolladoù kenta da vestr an tele, **Bentley**. Med hemañ n'ema ket e-unan o selled outo. D'e heul ema **Paotr e vleo ruz**, euz an Arme Guz.

« Brao ar film, ya, med danjeruz evel eur hlenved-red spontuz. » Setu ar varnadenn. Ouspenn, ha gwir eo ar pezh a zispleg? Bleo ruz a yelo da weled. Garth n'hell nah e gompagnunez. Hag er geoded, den an Arme Guz a furch e peb leh, a lak an dud da gomz. O, seven eo, mar deo dihoarz-krenn!

Er Cêrveur e varner: ar film-ze n'hell ket beza diskouezet: gouest e vefe c'hoaz da lakaad soñjou foll da zevel er sperejou gwan. Gwasoh: hervez den an Arme Guz n'eo ket ar film hebken a zo danjeruz, med Cafflogion, daoust dezi da jom dianav!

E Cafflogion e sav tabut etre Steffan

hag Ieuan. « Eur fazi braz on-neus greet. Aon am-eus evid dazond ar geoded. Ha ne vefe ket mad ha reiz prena armou?»...

Peseurt daremprejou a vo breman etre bugale ar frankiz ha roboted ar stad spier?...

Savet eo bet ar romant-parabolen-mañ (1), e kembraeg, gant **Gerallt Jones**; lakeet eo bet e brezoneg pinvidig hag êz gant **J. Abasq**, ha skeudennet gant **P. Herve**.

K. Riou.

(1) **Cafflogion**: 20 lur (250g) e ti **Brud Nevez**.

R. GERALLT JONES

CAFFLOGION

bet lakeet e brezoneg gant

J. ABASQ

Eul leor skiant-faltazi!

Priz kenta an Eisteddfod, 1979

20 lur (150g)

Penaoz e vez lavaret?...

Pladennou

Evel just, n'eo ket ar wech kenta ma embanner eul leor da zisplega yezadur ar brezoneg. **Kervella, He-mon, Nedeleg, Gros** ha reou all c'hoaz, er hantved-mañ, o-deus savet seurt leoriou. Ha bez' ez eus atao da gutuill en o oberennou.

Med tud 'zo ha na blij ket dezo trei pajennou ha pajennou e leoriou eun tammig teo, ha luziet - a zoñj dezo. Hini **A. ar Merser** n'eus ket da spon-ta razañ: 100 pajenn, moulet frêz. Bez' eo eun diverra, eur « yezadur bihan », evel m'eo merket war e holo. Ne gaver ket ennañ displegaduriou hir evid tud hag o-deus c'hoant da ober stудиou uhel war or yez; eul le-or-dorn eo avad evid ar re o-deus ezomz da gaoud prim eun diskleriadur, eur sklerijenn resiz ha berr war poent-mañ-poent. Evid se, A. ar Mer-ser a ro da gompren, gant skweniou nijeruz, ar reolennoù penna; merka 'ra an doareou disheñvel a zo tu da ober ganto. Ouspenn, e-kichenn ar stummoù boazeta er yez skrivet, e ro o flas da re all, anavezetoh e korn pe gorn euz ar vro.

K. Riou.

A. ar Merser: Précis de grammaire bretonne. 20 lur (200g).

Mari Harnay: ar choaz mad

Souezuz eo e vije bet red gortoz betek fin ar bloaz 1982 evid kaoud eur bladenn a-bez gant eur ganerez hengounel deuz rummad ar re goz: euz hini **Mari Harnay** euz Prijag er vro-Bourlet a fell din komz. Bet zo bet greet eur gasetenn d'an nebeuta gant **Tintin Mari Moan** euz Goulien er Hab-Sizun, med, din da houd, pladenn ebed. Perag eta?

Peogwir, moarvad, e sonje d'an dud ne dalveze ket ar boan henn ober. Med abaoe 1968 dre vraz, ez eus muioh a dud troet war ar hanaouen-nou hengounel e Bro-Hall. Setu o-deus sonjet tud zo e Radio-Frans e vefe mad sevel eur rummad pladen-nou diwar **Hengouniou Poblou Bro-Hall**.

Poent braz e oa! Benn deg vloaz ahann e vije bet re ziwezad. Evid Breiz, eo **Mari Harnay** 'ni zo bet choazet. Anavezet mad eo dija, ha pelloh evid ar vro-Bourlet. Pell zo e oa bet D. Laurent ha Cadic o klask kanaouennoù digant.

Med perag choaz anez? Peogwir eo unan euz or gwella kanerezed hengounel hag ivez unan euz ar re a oar ar muia gwerzioù ha sonioù. Ar zeiz kanaouenn euz ar vro-Bourlet a glever amañ n'int nemed eun tañva euz an oll re a oar Mari Harnay, ous-

penn eur hant anezo, hag ema **Dastum** o soñj embann en eur haier.

Diwar ar peder gwerz a glever a-mañ eo eo **Loeizig ar Ravaleg** an hini fromusa: savet eo bet diwar eun torfet bet degouezet pell zo er vroz; diskouezet e-neus Donatien Laurent en e studiadenn ez eo gwir ar pezh a zo displeget er werz. **Mariann ar Hlañdi** eo ar blijuza euz an teir zon: brao-tre eo kanet daoust ma n'eo ket klok an destenn.

Setu eur bladenn a zo dispar: kaoud a reer a-leiz a zisplegadurioù war kanaouennoù hengounel Breiz hag ar homzou, e brezoneg evel just, med ivez e galleg hag e saozneg, heb dizonjal poltrejou-kaer ar ganerez en he zi hag ar gartenn da ziskouez e-touez traou all peleh-ema ar vro-Bourlet.

Koulskoude, evid ar pezh a zell euz brezoneg ar hanaouennoù e vije bet gwelloc'h, a gav din, skriva dalhmad

just ar pezh a gan Mari Harnay; e-leh a-mañ eo bet skrivet hervez he doare da zistaga a-wechou ha gand ar stummou lennegel gwechou all.

Posubl e vije bet kaoud eur ganerez « gwelloc'h » eviti: daoust ma kan mad, ez eo techet da gana ar poziou memez mod beb taol, e-leh a zo, pe marteze a zo bet, (soñjal a ran da skwer 'barz **An Itron Bertrand** deuz Kanuhel) kanerien ha kanerezed ha ne ganent ket diou wech en hevelebr doare; felloud a ra din komz deuz an « adstummou » soutil hag a zo merk ar gwella kanerien hengounel.

Daoust da ze, ez eo eur bladenn a ranko selaou an oll re a vour doh sonerezed hengounel Breiz rak kalz nive-rusoh ha pouezusoh eo he ferziou mad eged he terziou tall, ma'z eus euz ar re-mañ.

J. Goyat.

Andreo ar Merser

Précis de grammaire bretonne

Dalhet 'z eus bet kont euz an oll rannyezou.
20 lur (250g) evid koumananterien Vrud Nevez.

Keleier ar miz.

Euz an eil devez d'egile

– E hanternoz Bro-Hres, e vev eur boblad-tud, anavezet abaoe an Henistor, ar vakedoned anezo. Rannet int bremañ etre teir bro: ar Hres, ar Vulgari hag ar Yougoslavi. Ne vez kelennet o yez, war a zeblant, nemed er vro diweza-mañ. E Skopje ez eus eur skol veur.

Mad. Pa felle da Vakedoned euz ar Hres ober studiou skol-veur en o yez, ez eent da Skopje, na petra 'ta, pa ne oa ket tu d'ober en eun doare all. Mez eur yez vihan ez eus euz ar makedoneg, hag evid « divenn » o studierien « outo o-unan », ez eus bet roet urz da studierien Vro-Hres d'ober o studiou netra ken nemed e gresianeg pe en eur yez vraz all! Komprenet ho-peus! Saveteet eo bremañ ar paour-kêz studierien-ze.

– Or heneil **Kristian Brisson** an hini eo bet roet dezafañ ar priz **Per Roy** gand **Breuziezh ar Skrivagnerien Vreizad**, eo en em vodet heh izili e Kastellbriant d'an 23 ha d'ar 24 a viz ebrel. Evid e romant **Ar reder-mor**, embannet gand **Brud Nevez** eo e-neus bet ar priz-se. Sed a ziskouez ez eo prizet gand ar re lenn anezañ. Dija e-noa bet skrivet **Ouest-France** eo « une œuvre attachante, sorte de roman poétique qui n'est pas sans rappeler G. de Nerval. » War **Al Liamm** e oa bet barnet yez ar romant evel « pinvidig ha lennegel gand eur hemmesk souezuz a-walh euz stummou distaga rannyezal »...

– Ma'z eo bet en em vodet Breuziezh ar Skrivagnerien Vreizad e Kastellbriant, eo, hervezi, evid addisklêria ema bro an Naoned e Breiz hag eo an Naoned kêrbenn Breiz hervez an istor. Med poan he-deus ar vreuziezh o sacha bete q emni ar skrivagnerien a zo o

chom er 5ved departamant: diwar 100 barz a vije bet kontet eno, n'eus nemed pevar er vreuriez. Da **Gilbert Mercier** eo bet roet a-hend-all priz braz ar Skrivagnerien Vreizad, evid e leor **Le pré à Bourdel**, embannet gand **Le Mercure de France**.

– Sindikad an **FEN** eo a zo bet an hini kenta, e fin toud miz meur, o rei da houzoud e vije anvet 26 a gelennerien war ar brezoneg, 'benn digor ar skoliou e miz gwengolo. E gwirionez e oa 12 anezo e plas dija ar bloaz-mañ. Hervez an **FEN**, eo kalz brasoh evid se an ezommou, ha 200 a gelennerien eo a vije da veza anvet: « da nebeuta e rankje beza eur hant, ma zo c'hoant o-dije ar reolennou nevez eun dalvoudegez bennag. » Laouen eo ar sindikad o weled servij publik an deskadurez o kemer kelennadurez ar brezoneg war e gont, med kaoud a ra dezañ emañ pell euz ar pezh a faot. Ar postou nevez o veza bet roet da liseou euz ar hêriou, ar skoliou diwar ar mêz eo o-deus bet an nebeuta, eme c'hoaz an **FEN**. Evid **Unvaniez ar Gelennerien war ar Brezoneg**, eo an nevezintiu-ze « aluzennou truezuz » nemetken. « Hervez ar justis sevenadurel, e tleje da vihanna ar zaozneg hag ar brezoneg beza war ar memez troad, e Breiz, e-keñver gwirioù hag e-keñver peadra », eme c'hoaz an **Unvaniez**.

– Divizet eo bet gand ar **Huzul Sevenadurel** e vije dalhet d'an 11 a viz even eun devez studi all diwar-benn ar hudennou sevenadurel e Breiz. Kaoud a ree dezañ ne oa ket bet aozet mad an « **Etats Généraux** » a oa bet dalhet e miz c'hwevrer. Komisionou-labour a dle beza bodet en a-raog da weled kement a zo d'ober war dachenn ar zevenadur er vro-mañ.

– Muioh-mui a bres a zo da studia galleg Breiz-Uhel. Nevezig 'zo, e-neus **Serge Jouin** divennet eun dezenn dirag skol-veur an Naoned, diwar-benn galloeg Abbaretz, e bro an Naoned. Med keñveria a ra doare-komz e gêriadenn gand hini kormiou all euz ar vro hallo, ha gand rannyezou galleg all.

– Dre ar hazetennou pemdezieg, eo bet klevet e oa eet war o leve daou deknisian euz FR3 Brest, **Yves Kermareg** ha **Marcel Cuzard**, hag a oa an hini kenta o labourad 20 vloaz 'zo pe war-dro evid ar radio, hag egile 12 vloaz zo, evid an tele. Gand se, e-neus bet tro Ifig Kermareg da labourad war abadennoù brezoneg ar radio gand Charlez ha Channig ar Gall da genta, ha gand F. Broudig ha Mari Kermareg da houde: zoken ma n'eo ket bet

klevet e vouez (kazimant) morse, eñ moarvad eo e-neus bet greet ar muia a abadennoù brezoneg, pa veze atao diouz kostez ar mekanikou! Marcel Cuzard a oa eñ skoazeller ar henta skipaill tele e Brest, ha dre ze e-neus bet labourad war **Breiz o vev** er penn kenta, ha war **Nozvad** da houde. Brezonegerien a zo anezo o-daou.

– D'an 9 ha d'an 10 a viz ebrel, e oa **Kan ar Bobl** en Oriant. Marteze n'eo ket bet tre ken darempredet hag ar bloaveziou all. Evid pezh a zell ar strolladou muzikerien a hiz nevez, ez eus bet klevet a beb seurt ganto. Digand an delennourien avad, ez eus bet klevet traou a-zoare meur a wech, ha deuet e oa 24 da gonkouri, pezh a ziskouez e ra ar sonerez-teleenn muioh-mui a verz dre amañ. N'heller ket avad lavared kemend-all diwar-benn ar han e brezoneg. Kanaouennou koz a ganer bepred berniou, e **Kan ar Bobl**, koulz da zañsal hag a-boz, hag en eun doare plijuz peurvuia. Med kanaouennou nevez na glever ket nemeur, hag ouspenn ze, ar re a zo bet kinniget e rumm ar « hanaouennou nevez e brezoneg » ne oant ket dispar. Ar strollad a zo bet dibabet da vond da Gillamey a-benn kenstrivadeg ar **Celtavision** eo hini **Korriganed er Lann**: evel beb bloaz, o-deus soñjet ar re-mañ e oa red dezo sevel eur zonenn en enor d'ar Gelted. Skuiza a reer neoah o klevet kana seurt falz-meuleudiou d'ar Gelted dalhmad. Diêz eo kompren perag ne zaver ket a-benn ar Celtavision a zoniou war n'eus forz petra all, ar garantez, ar peoh, pe me oar-me... Gwelloh e vije da qomite ar « Celtavision » chom heb kas den ebed a Vreiz da Gillamey, ma'z eo evid mond da gana seurt disterachou du-hont. Ar muzik nag an doare nan eo ket toud.

Padal, dispar eo bet kavet al labour a zo bet greet gand ar skoliou ha gand ar vugale ar bloaz-mañ, ha n'eo ket heb rêzon o-deus an arvestourien straket o daouarn kement ha m'o-deus gallet da vugale skol publik **Sant-Nikolaz ar Pelem**, hag o-deus c'hoarriet dirazo eur gwir pezh-c'hoari euz ar henta.

– 18 a vagadou a zo bet o kemer perz e Gwened e lodenn genta ar genstrivadeg a vez aozet beb bloaz gand **B.A.S.** Er rummad kenta eo **an Alre** a zo en em gavet just a-raog **Kemper**. N'eus ket bet tra-walh a blas da zigemer an oll zelaouerien e sal vraz Palez an Arzou e Gwened.

– D'an 23 a viz ebrel, e oa devez ar varzoniez dre ar vro a-bez,

war houlenn ar Ministr **Jack Lang**. En oll hêriou, ez eus bet displegadegou, lennadegou ha diskouezadegou e peb mod hag e peb giz. Ne zeblant ket o-dije bet en em roet ar vrezonegerien da gleved kement-se da geñver an deiz-se. War an tele memes-tra, on-eus bet eun abadenn **Breiz o veva** leun-kouch a varzonegou a beb seurt, hag a oa kinniget gand **Y.B. Piriou** ha kaset da benn gand **Mari Kermareg**.

– D'an 30 a viz ebrel, eo bet skignet istor **ar soudard Frañsez** war FR3-Breiz, a-raog ma vije e Frañs a-bez. **Philippe Durand** eo e-neus skrivet anezañ, ha kaset an abadenn da benn. Eñ eo e-noa bet greet dija eun toullad bloaveziou 'zo ar film **Yez ar vez**, hag a oa bet kavet dister a-walh peurliesia. En e film-tele, e kont istor eur zoudard yaouank ginidig a Vellionneg, ha bet fuzuillet e-pad ar brezel kenta dre ma ne ouie ket a halleg. Gand darvoudou a-vremañ e-neus P. Durand mesket an istor-ze, hag a zo bet c'hoariet gand amatourien, war-bouez unan. Ar pezh a vrezoneg a zo er film a oa is-titret e galleg.

– Abaoe warlene, zo daou vrezoneger hag a nah pêa o vigne-tenn-wetur. Pe da nebeuta, e-neus unan anezo pêet talvoudegez e hini da ospital ar re goz e Gwengamp, hag egile e hini d'ar skoliou « Diwan ». Meur a wech int bet tapet gand an archerien, med beteg-henn, n'int ket poursuet. Hervezo, eo eun doare da glemm war ar stad a reer euz ar brezoneg.

– E Brest eo echu da **Di ar Zevenadur**. Eur bloaz 'zo e oa bet distaget an aferiou sevenadurel euz an ti-kêr, gand ar huzul a-gleiz a oa e plas d'ar poent-ze. War-eeun e-neus c'hoant ar huzul nevez a-zehou da ren anezo e-unan adarre. Eun diviz hag a vo tro, kredabl braz, da gomz dioutañ a-nevez, rag n'o-deus ket c'hoant an oll da lezel ober evel-se...

– Daou zevez da zerhel, evid an oll re hag a gar ar han a-stroll: lazou-kana euz Breiz hag euz ar broiou keltieg all a zo bet pedet d'en em voda e Brest a-benn ar 4 hag ar 5 a viz even. Aozet e vo an daou zeveziad-ze gand **Kreizenn an Arzou-Pobl**.

Kemennou

– Kinnig a ra ar **Greizenn Vakañsou Bugale Brezoneg** (sic) tremen teir zizunvez, euz an 29 a viz gouere beteg an 21 a viz eost, e Sizun, Penn-ar-Béd. Digor 'vo d'ar vugale a n'ouzont ger brezoneg ebed, pe nebeud-tre a vrezoneg. Greet e vo war-dro ar vugale gand tud ampart war ar brezoneg, a lako anezo tamm ha tamm da implij ar yez. Kampi a raio ar vugale ha mond a rint da neuial er poull-dour. Priz: 1450 lur. Skriva da: Ar Falz, 6, strêd Hir, 29210, Montroulez.

– A-benn fin miz even, e teuy er-mêz tri leor all a istoriou treset, o konta istor Jonathan, eur suis yaouank o kantren dre vro an Tibet. Heuillit anezañ a-hed an tri leor, treset dispar 'giz emaint gand Cosey. Bez' e heller kaoud an tri leor marhadmatoh en eur ragprena anezo a-raog an 30 a viz even. Kousta a ray deoh pep hini 26 lur. Skriva da: Keid vim beo, Oaled ar re yaouank, 29112, Brieg.

– Kas a ran deoh eur gerig evid kemenn digoridigez va stal « **Kornog** », leh ma vez kavet an oll leoriou brezoneg, hag ho re en o mesk. Gand ar spi d'ho kweled edan berr amzer...
Jorj-Laorañs **Jouin, Kornog**, 22, strêd ar Vur, 29210, Montroulez.

– Deut zo er-mêz, nevez 'zo, eul levr da zeski lwerzoneg embannet gand **Ober**. Troet eo bet e brezoneg gand daou zen ampart war an diou yez. Al levr-mañ, hini M. Ni Ghrada eta, a vo talvouduz-kenañ d'ar re, brezoneg ganto, o-dije c'hoant da gregi gand yez ar Gaeltacht. Sikouret e vo ar skolidi gand kasedigou evid ma vefe reiz o distagadur hag êsoh o labour.
Evid gouzoud hirroh, skrivit da: Ober, Gwaremm Leurvên, Plufur, 22310, Plistin.

Lizerou

– Kas a ran deoh va adkoumanant a-gevred gand va gwella gourhemennou. Lenn a ran ho kazetenn gand plijadur, hag e kav din zoken ema o vond war-well. Keuz am-eus bet o houzoud e oa eet P.M. Mevel da anaon. Eur brezoneger euz ar henta e oa, hag e prizen kalz e labour. Soñj mad am-eus anezañ, rag e oan en em gavet gantañ e Gouel ar Brezoneg e Gwengamp warlene, ha d'ar mare-ze e seblante yah ha solud. Kas a ran va gwella gourhemennou a gen-gañ d'e diegez ha d'e vignoned.

L.A., Pleherel.

– Meuleudi d'an oll re a gas da benn embannidigez eur gelaouenn a gavan ken plijuz. Fonnusoh-fonnusa e teu da veza bewech.

J.L.S. Kleder.

– Digarezit ahanon evid beza daleet ba bêa va adkoumamant. A-hend-all, ho kelaouenn a blij din kalz. Kendalhit!

P.L.P., Pleuvian.

– Va adkoumanant: moarvad eo ar wech diweza, hervez a gredan, hag e hetan e vin en eur béd all ar bloaz a zeu. Amzer a-walh am-eus tremenet war an douar: pevar-ugent vloaz! Chañs vad deoh ha ra yelo war gresk lennerien Brud Nevez!

P.R., Roazon

– Eur houmanant evid netra a oa bet greet din beteg-henn. Peogwir e kavan plijuz ar gelaouenn, 'mefe c'hoant d'adkoumananti... En eur heti deoh chañs vad ha buhez hir d'ar gelaouenn, emañ ganeoh evid ar vro.

P. V. K., Kemper.

– Lennet em-eus gand aket ar pennad « Bet sevenet gand eun ti-kêr evid yez ha sevenadur Breiz » e dalbenn, embannet gand A. Keravel e-barz niverenn 62 « Brud Nevez ». Evel-se on deuet da zoñjal e traou 'zo. Ar goulenn pouezusa eo: petra o-deus greet tud an tu kleiz evid ar Vretoned hag ar brezoneg e-pad an daou vloaz m'eo bet tost diharz o galloud? Nebeud a dra, d'am zoñj-me! (...) Plijoud a rafe din kaoud paperennou-goulenn « Emgleo Breiz » evid o has d'am mêr: evid se e kasan deoh eur golo gand va ano.

B.C., Roazon.

